



Imboourc'h

Niverenn 74
29 C'hwevrer 1976

IMBOURC 'H, KELAOUENN BOLITIKEL

Seizhvet bloavezh

Niverenn 74

29 C'hwevrer 1976

Kemenn.....p.78
Roll ur strollad broadel e Breizh....p.79
A-dreuz mirdioù Breizh gant J. Brohanp.95
Luskad "Kevredigezh Broadel Breizh"
war-lerc'h ar brezel kentañ.....p.101
Danevelladurioù.....p.113
Notennoù diwar-benn armerzh Breizh...p.135
Burutellerezh. E sigur "En donvor da
Vreizh".....p.139
Lizhiri.....p.146
Keleier berr.....p.148

Koumanant-bloaz : 35 lur. KRP : Y.Ollivier,
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houma-
nant e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 8 lur. Ar pennadoù a
zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,
35000 Roazhon. CPPP : 50 015.

=====

KEMENN

EVEL BOAZ E KASIMP an teir niverenn niverenn gentañ eus IMBOURC 'H 1976 da goumananterion 1975. Anaoudek e vefemp enta ouzh ar re anezho ha na vefent ket mennet da adkoumanantiñ da reiñ o soñj da c'houzout deomp.

An niverenn-mañ hag an niverennoù a zeuy war o lerc'h a vo niverennoù ordinal. Padal emamp e soñj embann enno, pennad ha pennad, kendalc'h ISTOR AN EMSAV, eil prantad (1918-1944). En niverenn-mañ end-eeun e vo kavet ar pennad a zo gouestlet d'ar "Bretagne Intégrale" embannet war-lerc'h ar brezel kentañ gant an Estourbeillon. A-c'houdevezh e vezo adembannet an oberenn-mañ.

En niverenn a zeu e vo embannet ur pennad all eus istor an eil EMSAV hag ivez un danvelladur diwar-benn steuziadur ar gatoligiezh hengounel e Kembre er XVI-XVIIvet kantved.

=====

ROLL UR STROLLAD BROADDEL E BREIZH (I)

Abaoc'h ar brezel diwezhañ n'eus bet e Breizh aozadur politikel ebet a c'hellje bezañ brudet mennad ar vrogarourion a fell dezho adober eus Breizh ur gum-uniezh politikel dizalc'h. D'ur mare zo e oa bet soñjet e vije gouest ar MOB da c'hoari ar roll-se. E gwirionez e oa sellet ar MOB etre 1960 ha 1964 gant ar c'hedveno e Breizh evel kendalc'her ar strolladoù broadel breizhat eus a-raok hag e-pad ar brezel.

Gant disrann an UDB ha dreist-holl krouidigezh nouspet strollig kleizelour breizhat war-lerc'h 1968 ez eo bet luziet ar saviad-se. Adal ma oa meur a strollad breizhat war an dachenn, hini ebet anezho n' assamme e unan ar stourm brezhon politikel penn-da-benn. Moarvat e padas ar MOB un nebeut bloavezhioù war-lerc'h disrann an UDB hogen dizeriañ ne reas ken goude 1968 daoust ma kendalc'has Yann Fouere hag e vignoned da embann ar gelaouenn 'L'avenir' betek hiziv. D'ur mare zo ivez, e 1972, e klaskjod adsevel un doare MOB dindan an talbenn "STROLLAD AR VRO" a venne bezañ, da gentañ, ur strollad broadel hengounel. Ret eo krediñ avat ne oa ket sklaer a-walc'h pe, da vihanañ, diskleriet resis a-walc'h, pennaennoù ar strollad nevez pe, neuze, o devoa soñjet an diazezerion anezhañ e oa tu da vodañ

stourmerion a bep tuaden aozadur:pezh a zo sur eo e troas SAV emberr war-du ur gleizelouriezh kourmoulek a-walc'h nemet oc'h ober dave da veizourion pell bras o sturiennoù diouzh re ar c'hostezennoù hengounel breizhat, Proudhon ha Bakounin (ha n'oa ket bet lennet o skridoù biskoazh, emichañs, gant hini ebet eus ar re a rae dave dezho) (1), lakaomp. Kement-se a raent avat, hepken, evit en em ziforc'hañ diouzh an UBD o klask bezañ rusoc'h c'hoazh egeti.

Diouzh un tu all ez eo c'hwitet abred an arnoù da sevel strollouigoù dehouelour breizhat ; aet eo da get buan gronnoù "Breizh yaouank" a c'hellje bezañ bet egin ur Strollad breizhat dehouelour. Seurt c'hwitadenn a c'heller diskleriañ dre veur a abeg. Unan anezho ez eo tu nac'hañ ur seurt arnod : arbenn kentañ ur strollad dehouat e Breizh er c'hendegouezh politikel a vremañ ez eo enebioùzh ar strolladoù kleizad brezhon en em gav dija war an dachenn. Diouzh un tu all ez eo ret anzav n'o devoa izili ar strolladoù-se stuziadur politikel ebet rak ken buan all e troent, p'o deveze tro, a-du gant kostezennoù an tu kleiz pellañ, dedennet dreist-holl gant luganoù trivliadus. A-hend-all ne weler ket mat petra a c'hellfe ur strollad dehouat breizhat kinnig d'an danvez stourmerion hiziv. Difenn ar gevallouriezh frankizour hag ar gevredigezh veveziñ pe an

(1) Evit bezañ reizh e ranket menegiñ e veze meneget Proudhon gwechall gant ar Markiz de l'Estourbeillon.

"amerikan way of life" ? Ne vefe ket gwall skedus. Diwall Breizh diouzh Soviediz ? N'eo ket afer an emsav, n'eus forzh penaos. Difenn Breizh a-enep d'an etrevroadelouriezh ? N'eus ket gwashoc'h (pe gwelloc'h, mar kirit) broadelourion eget ar gomunourion ur wech m'o deus kemeret ar galloud en ur vro. Soñjit er Vietnam, da skouer. Gwareziñ ar sevenadur kristen ha difenn an Iliz ? N'eus mui na sevenadur kristen nag Iliz ebet. Tu a vefe d'ur strollad dehouelour bezañ faskour ha gouennelour met kement-se n'eo ket brudet mat e-touez an dud, ret eo anzav. Neuze 'ta, da betra e c'hell servijout ur strollad dehouat e Breizh ? Ar gealiadurezh nemeti a glotfe a-walc'h gant mennad ur strollad dehouat a vefe ur stadelouriezh diouzh giz Maurras pe un hengounelouriezh romantel adal ma n'eus mui hengoun ebet ; houmañ, n'eus forzh penaos, n'he defe diazez prederouriezh-el ebet.

Maz eo dic'hallus avat krouiñ ur gostezenn dehouat breizhat n'eo ket gwell evit keloù se saviad ar c'hostezennoù kleizelour en hor bro. E devoud e welomp an eil gronnad kleizelour breizhat war-lerc'h egile pe o tizeriañ pe o kuitaat an emsav (ha peurvuiañ o kuitaat an emsav peogwir ne ra nemet krakveañ). Meneget hon eus degouezh ar "Yaouankizoù Araogelour" a zo en em staget ouzh ur strollad "marksat-leninat" gall a-du gant Sina (o krakveañ ivez e par Bro-C'hall nemet pouezusoc'h,

evelkent, eget o strollig-int). Setu bremañ avat ar 'Strollad Komunour Breizhat', bet morgousket, gwir eo, abaoe ur bloavezh bennak (ne zeue mui zoken er-maez e gelaouenn "Bretagne Révolutionnaire") a zo o vont d'ober kement-all hiziv ha da guitaat ivez an emsav. N'eus forzh penaos e oa chomet ar 'P.C.B.' a-ziforc'h diouzh an arnod da grouiñ an talbenn F.A.S.A.B. e skeud ma n'oa ket graet an unanidigezh war "ziazezoù renkadel sklaer". Diwar vremañ avat e fell d'ar 'P.C.B.' sevel ur c'hevredad breizhat (pemp departamant evelkent ; ne ouzer ket perak met evel-se emañ) eus ur 'strollad dispac'hel c'hwec'hkognek'... a zo da vezañ krouet (neuze e vo er c'hwec'hkogn ur strollad dispac'hel ouzhpenn e-tal ar strolladoù trotskiat ha maoat ha nouspet strollad all) ; hag ouzhpennañ a ra al lizherkemenn ez eo ali stourmerion ar 'P.C.B.' gant stourmerion ar gronnadoù 'Révolution' ha 'Gauche Ouvrière ha Paysanne' (1) pa lavar ar re-se "ne c'hell dieubidigezh Pobl Vreizh gwiskañ e nep degouezh stumm ur stourm a zieubidigezh vroadel oc'h emplegañ un emglevadur gant ur vourc'hiziezh vroadel vrezhon..." Bezet pe vezet, fellout a ra d'ar stourmerion-mañ stagañ dieubidigezh Pobl Vreizh ouzh hini ar renkadoù hag ar pobloù gwasket er c'hwec'hkogn'.

(1) N'anavezomp netra diwar-benn ar gronnadoù-se a zo awenet, marteze, gant pennaennoù ar P.S.U.

Burutellañ a raimp pelloc'h diskleriadenn ha savlec'hiadur nevez ar P.C.B. Gwelomp bremañ avat embann diwezhañ "Stourm Breizh" en deus nevez kemennet e kuitae talbenn ar F.A.S.A.B. (ha na chom mui ennañ nemet ar "Comités d'Action Bretons", reolet gant G. Caro, hag ur S.A.V. amsteriek hag o reuziañ ouzh un enkadenn da heul embannidigezh al levr "B comme Barbouze" o wallvrudañ unan eus an izili anezhañ). Er c'heñver-se e ve mat studiañ an diell skignet gant ar stroll-se da geñver e gimiad diouzh an talbenn. E galleg ez eo bet skridaozet ha re hir eo evit bezañ troet en e hed er gelaouenn-mañ. Klask a raimp hepken krennañ an tamalloù a zo graet enni d'ar strolloù all ezel eus an talbenn.

Er pleustr e tamall "Stourm Breizh" ouzh renerion ar 'F.A.S.A.B.', ouzh Gi Caro, diouzh un tu, hag ouzh ar gelaouenn 'Combat breton' diouzh un tu all, bezañ en em zalc'het e-giz pa vije ur strollad eus ar F.A.S.A.B. pa n'eo nemet un talbenn ha bezañ roet da grediñ e oa ar strollad-se, a-hervez, a-du gant an emvelestrezezh e diabarzh ar Stad c'hall pe Europa paz eo ur stroll evel 'Stourm Breizh' - m'hqn eus komprenet mat - a-du gant an dishualded.

War zaou boent all avat ez eo enebet 'Stourm Breizh' ouzh strolloù all eus an talbenn : hini ar gev-alouriezh hag hini an impalaouriezh.

Unan eus ar stolloù ezel eus ar F.A.S.A.B. - S.A.V. - o vezañ diskleriet n'eus ket pellzo e talvez 'emvererezh', d'e soñj, kement ha 'kenvererezh' e respont 'Stourm Breizh' e ra -eñ eus an emvererezh fizierezh ar veli e kuzulioù micherourion ha kouerion (ne gomz ket avat eus kengladekadur an araezioù-kenderc'hañ hag an douar, peurgent.) Digarez a gemer skridaozerion al lizher-kemenn-mañ diwar se evit tagañ ar 'Stad', dre vras, hag ar sevenadur arnevez gant kement a aparchant dezhañ : ar politikerezh, an tiez-bac'h, ar skol, ar greanti, an Iliz h.a.

War un dro e tiskleir 'Stourm Breizh' emañ a-du gant Palestiniz hag a-enep da Israhel (bezañ a-du gant Palestiniz a zo sellet er stolloù ruz-tan-mañ evel ur merk-barn difazi eus dispac'helezh wirion hag eus enep-impalaouriezh diles).

Un arvez eus kealiadurezh 'Stourm Breizh' n'eo ket meneget amañ : an amvevadouriezh. Ma vije bet meneget he dije klokaet taolenn ar vennoziadeg-mañ a hañval bezañ awenet gant un naturelouriezh diouzh giz Rousseau mesket gant un dispac'helouriezh a glask he dodennoù en emsav sokialour marksat hag anarkour. Padal seurt anarkouriezh a zo pell bras diouzh preder Marks hag e ziskibion verzhekañ, Lenin ha Mao, lakaomp. An 'enep-sionouriezh' hec'h unan ne dalvez netra. O vezañ ma kaver alies a-walc'h er stolloù kleizelour

izili o tennañ o orin eus gwiskadoù 'bourc'hiz-bihan' bet gounezet d'ur mare d'un doare faskouriezh ne ra nemet reiñ ul liv nevez d'un enep-yuzevadegzh a-ouenn, koulz lavaret.

Er-maez eus ar F.A.S.A.B. ez adkaver an hevelep temoù anveliour e-barzh kevredad breizhat ar P.S.U. (ur c'hevredad ha na c'holo nemet pevar departamant ar rannbarzh-steuñv, pezh a ziskouez n'eo ket gwall uhel ar spered emsavel en e greiz). Klotañ a ra ar c'hevredad-se gant an hini korsikat hag an hini euskarat ha n'en deus darempred ebet a-hend-all gant ar F.A.S.A.B. El lizher-kemenn embannet gant kevredad breizhat ar P.S.U. enta ez adkaver an hevelep dodennoù anarkour hag a geger ganto e diskleriadennoù ar stolloù hon eus meneget e deroù ar pennad-mañ. "Kenderc'hel a ra ar c'hevredad" eme ar skrid-mañ, "gant an hevelep emgann hag a zo renet gant ar P.S.U. e unan evit distrujañ ar Stad C'hall, eztaol hag harp ar gevalaouriezh..." ... "Diogeliñ a ra ez eus anezhañ un ezel kemperzh eus an emsav brezhon a hiziv hag ez eo mennet da herouezañ e emdroadur war-du savlec'hioù enep-kevalael ha dispac'hel...."

E-touez an amkanioù war ar roll e teu d'ar sell "dilennadur ur vodadeg rannvroel dre hollvouezhiañ, steuziadur amaezhva ar bPrefeded ha lamadur a-nebeudoù an 'departamantoù' a-benn ma vo gwarantet da Vreizh ev-el d'ar c'hengladoù(1) istorel all, dre ur reizhiad

(1) "Collectivités".

sokialour emveret, ar gwir d'an emdonkañ..."

Ar pezh a zo da verkañ er gemennadenn-mañ ez eo youl ar c'hevredad da gemer perzh en emsav(1). Daoust hag a-walc'h eo seurt hetadenn avat evit ober eus izili ar c'hevredad emsaverion wirion ? Ne gav ket deomp. Un istor assammet ez eo bet an emsav ha betek gwelout n'eo ket bet assammet istor an emsav gant izili kevredad breizhat ar PSU ; bez' ez eo an emsav ivez ur yezh herouezet, diorreet hag implijet er stourm politikel end-eeun. Ma varner diouzh ar merkoù-se e ranker anzav ez eo ar PSU breizhat pelloc'h c'hoazh diouzh an emsav eget ar strolloù kleizelour hon eus graet dave dezho uheloc'h ken e c'heller en em c'houlenn hag ez ay e emsavelezh en tu-hont d'an diskleriadennoù a seurt gant ar re emamp o paouez menegiñ. Notañ a ranker koulskoude ez a emdroadur ar PSU breizhat war an tu enep da hini ar 'PCB' pe ar 'Yaouankizoù Araogelour' peogwir e tisoc'h da rannañ ur strollad 'c'hwec'hkognek' unvan etre meur a unvez diazez, tonket dezho bezañ dishual, a-hervez, diouzh pennvoniou an'emvererezh'.

(1) Notomp er c'heñver-se ur gejadeg nevez aozet gant ar PSU e Paris d'an 18 a viz Genver a-berzh "Kengor ar maeskenelioù" e-lec'h e oa bet pedet dileuridi un aozadur sevenadurel breizhat da reiñ e ali diwar-benn ar c'henlabour etre PSU hag aozadurioù breizhat pe etre maeskenelioù ar c'hwec'hkognek hag ar PSU.

Gwelomp bremañ hag-eñ o deus ar strolloù ez eus bet kont anezho betek henn er pennad-mañ un dazont ben-nak e Breizh. Evidomp-ni ne gredomp ket nemeur o deus unan hogen n'eo ket en abeg da utopegezh o diarselloù politikel : uhelvennad pep aozadur politikel pe gravezel a emleg ul lodenn a utopegezh dre ret (ar gevredigezh komunour ma striv e sell dezhi an holl strolladoù komunour a zo utopek, e penn kont.)

Reishoc'h e ve rebech ouzh ar strolloù-se - hag ouzh re all, evel E.S.B. - chom hep loc'hañ diouzh savlec'hioù politikel resis. E-keñver bro, da skouer, n'int ket gouest da zibab evit mat etre 'Frañs' ha Breizh ha dre se e tianzavont talvoudegezh ar vrogarouriezh e n'eus forzh peseurt stourm politikel a zo. An holl strolloù-se n'int na gall na breizhat. Dedennet int bet gant Breizh d'ur mare, moarvat, hogen o vezañ ma ne reont nemet gant ar galleg ha ma ne zalc'hont kont ebet, koulz lavaret, eus Istor Breizh nag eus hini an Emsav ha n'anavezont e nep doare, emaint distaolet, dre ret bepred, war-du amgant ar Stad c'hall evel maz eo c'hoarvezet endeo en trede dekved p'en em zispartias ar 'gevreadelourion' diouzh luskad 'Breiz Atao'. Ha padal ez eo sklaer a-walc'h n'o deus Breizhiz tamm gal-loud ebet da gemer evel Breizhiz en egor politikel gall.

A-hend-all, gant o dispac'helouriezh prezegen-nel e tianzav ar strolloù-se ar saviadoù politikel fetis.

An Dispac'h a garfent seveniñ diouzhtu a emplegfe, a-benn ar fin, distrujidigezh ar bed greantel hag ijiner-ezhel kornogat paz eo anat, er c'hontrol, e fell d'ar boblañs mirout ar sevenadur-se, o paeañ n'eus forzh peseurt priz evit e virout ha pa vefe hini ur renad hollveliek a-gleiz pe a-zehoù. Moarvat e ranker strivañ hep astal e sell d'ur gevredigezh peurreizh (hemañ a zo ivez pal diwezhel ar gevangevreadelouriezh) hogen touellañ an dud hag en em douellañ eo diskouez ar pal-se evel unan da vezañ diræzet warc'hoazh beure war zigarez e vije bet tizhet - e peseurt doare ha pe dre hent ! -- e broioù isdiorreet zo eus an Trede Bed.

E gwirionez, an arbennoù a zegas stourmerion zo da zilezel ar stourm broadel brezhon evit kas war-raok, a-hervez, un Dispac'h hollvedel a vefe da ren, n'eus forzh penaos, e par ar Stad C'hall a zo aes da verzout : dic'houest int bet da grouiñ aozadur taldoudek ebet na kalonek a-walc'h evit emezelañ en un aozadur brezhon all ha na vije ket bet krouet ganto. Setu int bremañ, evel genaoueion an Trede Urzh e Breizh en amzer an Dispac'h gall eus 1789, o lakaat o holl c'hoanag en un Dispac'h gall ha na zalc'ho kont ebet anezho, evel-just, ma teu dezhañ - dre vuzhud - ober berzh un deiz. Pe daoust ha soñjal a ra dezho e ve barrek ar broadoù suj e Frañs da gemer ar galloud e Paris ? Ha petra eo Frañs ? Ha pere eo ar renkadoù gwasket e Frañs ivez ?

Pa soñjer ervat, amsteriek a-walc'h eo an droienn implijet gant meur a stroll kleizelour breizhat rak lakaat a ra war an hevelep live devoùdoù a zo diforc'h a-grenn.

Moarvat, emañ renkad ar vicherourion hag ul lodenn eus ar 'vourc'hiziezh-vihan' o vouezhiañ a-du gant strolladoù an tu-kleiz e Bro-C'hall pell diouzh ar galloud c'hoazher mare-mañ. Lavarout avat ez int 'gwasket' a zo un dro-lavar a ya en tu-hont d'ar wirionez hag a zo touellus rak goulakaat a rafe a-walc'h ez eo ar gevrenn-se eus poblañs "Frañs" prest d'en em sevel a-enep d'ur rumm mac'homerion, ar pezh a zo faoz. Adal bremañ ez eo perzhiek ar renkadoù-se er galloud stadel, enframmet ha maz int er Riez c'hall. Dre se n'int ket gwasket evel ma c'hell bezañ ur bobl gant ur bobl all.

Diouzh un tu all ez eo ret ivez ober ur c'hemm etre ar gevrenn-se eus ar boblañs hon eus meneget hag ar frammoù led-stadel a zerc'houez anezhi. Eus un deiz d'egile e c'hell ar gostezenn gleiz kemer ar galloud er Stad c'hall. Daoust avat ha kemmet e vo un dra ben-nak er Stad-se en deiz ma c'hoarvezo ur seurt darvoud ha, peurgent, e darempredoù ar Stad-se gant Breizh ? An-at eo ne vo ket. Kemeromp un degouezh, hini an tireoul a c'hellfed kavout un deiz e Mor Breizh. Daoust ha prest e vo ar 'renkadoù gwasket' a hiziv, ur wech kemeret ganto ar galloud er Stad c'hall, da lezel an tireoul-se da

vont gant Breizhiz war zigarez maz eo perc'hentiezh ur bobl bet gwasket evelto gant an hevelep renad 'bourc'h-iz'? Gwall souezhus e vefe maz afe o madelezh betek eno!

Gwelomp bremañ degouezh ar pobloù gwasket ha notomp da gantañ ez eo dister o niver hag o fouez e 'Frañs' : dre se, peseurt dispac'h a c'hellfent seveniñ er Riez-se penn-da-benn ? Ha neuze 'ta, perak tremen dre 'Frañs' bepred evit seveniñ un dispac'h e Breizh paz eo ken dister nerzh ar pobloù gwasket, - mar bijent leun-emskiantek zoken.

Isverkañ a reomp ar ger diwezhañ-mañ rak diskouez a ra ervat peseurt ampleg a zo d'ar gwaskerezh a-enep d'ar pobloù, d'ur gwaskerezh, da vihanañ a c'hellfe bezañ santet evel ur gwaskerezh ha broudañ enta un ersav politikel : ma n'eus buhez kevredigezhel ha sevenadurel dizalc'h ebet (pe youlet da vezañ ha merkomp diwar dremen ez a ar vuhez sevenadurel kalz en tu-hont d'ar folkloraj) en ur bobl bennak peseurt gwaskerezh a c'hell bezañ embreget a-enep dezhi evel pobl ? Ma n'eus diforc'h ebet a yezh nag a sevenadur etre pobl Vreizh hag ar bobl c'hall penaos e oufe hounnezh bezañ gwasket gant eben ? Gallekaet eo pobl Vreizh hiziv koulz lavar- et peogwir ez eo aes d'an holl Vreizhiz gwitibunan-nemet un nebeut re gozh - komz galleg, lakaomp. Kement-se a dalvez enta ne vez renet ar gwaskerezh e Breizh war dachenn ar yezh hag ar sevenadur nemet e par an emsav,

kement ha ma klask hemañ krouiñ ur vuhez vroadel e Breizh ha maz eo miret outañ a gas e vennad da benn gant ar Stad c'hall ; diwar heul avat ez eo gwasket pobl Vreizh diouzh ma sell ouzh an emsav evel an aozadur ouzh e zerc'houezañ war dachenn ar politikerezh.

Setu dres avat : oc'h en em lec'hiañ en egor politikel gall en-dro e tinerzh ar strolloù kleizelour hon eus meneget ar stourm broadel e Breizh, kaer o devo lavarout ; e-lec'h labourat e sell da zieubiñ ur bobl wasket e strivont, a-benn ar fin, da veuziñ hec'h hini- ennelezh en ur gevaniezh politikel faltaziek ha, dre se, da zistrujañ hec'h emskiant bobl a zo hec'h arm kentañ er stourm a-enep d'ar mac'homerezh.

Erfin - hag an tamall-se hon eus graet alies d'ar strollouigoù kleizelour a zo o paotaat en hor bro hiziv - n'eus diazez prederouriezhel na kravezel sklaer ebet er fablaj dispac'helour m'eo kustum ar stourmerion- se d'ober gantañ. Bruzhnet evel maz int kenetrezo, a- hend-all, e vint skubet gant n'eus forzh peseurt gall- oud faskour pe gomunour reizhkred.


Lavarout a c'heller enta, en diwezh, e labour an holl strollouigoù-se a-enep da Vreizh ha d'an Emsav diouzh ma viront ouzh an izili anezho a vont davet un aozadur politikel brezhon sirius, gouest da c'hoari roll ur strollad broadel e Breizh (pezñ a zo dic'hallus d'an holl strollouigoù hon eus meneget er pennad-mañ).

En eil lodenn ar pennad-mañ e klaskimp gwelout
hag-eñ ez eus e Breizh ur seurt aozadur ha daoust hag-eñ
ha war beseurt diviz e c'hallfe an U.D.B., lakaomp,
c'hoari ar roll-se.

(da genderc'hel) H.K.

=====

[Faint, illegible text, likely bleed-through from the reverse side of the page.]





O hemolc'hin leoned ha tigred

A-DREUZ MIRDIOU BREIZH

gant Juliana BROHAN

E ser va gweladennoù e mirdi Roazhon e vourran o chom a-sav er c'hentañ solieradur dirak un daolenn vras a zo he zalbenn : "O hemolc'hin leoned ha tigred" hag a zo sinet gant anv Rubens.

Sebezet e vezer da gentañ gant krizder gwirion an oberenn : Europiz hag Arabed taget gant loened gouez hag o tifenn kalonek o buhez.

Bev buhezek eo an daolenn, ha taer da sabatuñ : ul leon, diwar ul lamm hepken, a laka da vrallañ ken-glotezh ar strollad tud ha kezeg, evel ma rafe ur bolod ; n'eus linenn eeun ebet en dresadenn nemet hini ar goafioù hag hini rez an dremmwel dindan korf ar marc'h gwenn savet a-daol-trumm war e baviou a-dreñv. Korfoù an emgannerion hag al loened e fulor a zo kemmesket gant o stummoù kromm kenweet. Ar mare skrijusañ eus an emgann ez eo hag e verzer e-kreiz an daolenn, gwintet brav e voue fuilhet er vann, ar marc'h gwenn, heñvel ouzh loen Diskuliadur Sant Yann ; an hini a zo a-c'haol warnañ a zo skrapet gant ul leonez kriz ha n'en deus ket bet amzer c'hoazh da c'harmiñ, ken prim eo bet an dagadenn ; e skoaz a zo drailhet etre dent al loen gouez hag a sank e skilfoù en e dal. Daoulagad ar paour kaezh den a zo dispourbellet gant ar gloaz. Kouezhet eo un den all war an douar tra maz eo dalc'het bras genoù ul leon all gant e genseurt nerzhus.

Spi hon eus e vo trec'h an dud daoust da se drugarez da zaou soudard a ouenn europat hag afrikat, prest d'o saveteiñ o sankañ don goafioù ha klezeier e korf al loened. Marv eo dija unan anezho, e foulenn loupard brav toullet-didoulet ; ul leonez all zo prest da dec'hout, o kas ganti en he geol he re vihan dizifenn. An oabl e unan a seblant kemer perzh er stourm

ha krediñ a rafemp a-walc'h klevout trouz an arnev mesket gant garmadennoù al loened ha klemmoù an dud oc'houzañv. Pep tra a fiñv ; damwelet e vez koulskoude sioulder ur mor pe ul lenn teñval dindan un neñv deuet rozha melen diwar sklerijenn ur c'huzh-heol peoc'hus ha dibreder.

Gwirion tre eo al livadur. War-lerc'h an arz degaset gant an azginivelezh italiat hag a oa e vennoz diskouez peurreizhded ar c'horfoù ez adkemer arz arc'hantved war-lerc'h, a reer anezhañ an "arz diskompez", doareoù heñvel, nemet o reiñ lusk dezho. Steuziañ a ra an treserezh disi ; ar pep pouezusañ n'eo ket mui ar pezh a zo hogen ar pezh a fiñv ; arz ar seitekvet kantved eo hemañ ha Rubens a zo unan eus arzourion vrasañ an amzerse.

~~~~~

Mat e vefe, moarvat, reiñ un nebeut diskleriadurioù diwar-benn buhez hag oberenn al livour-mañ.

Ur Flamank e oa enta Per-Pol Rubens ha ganet eo en harlu, e Siegen (Westfalia), e 1577 ; er gêr-se en doa bevet e dad goude bezañ kavet repu da gentañ e Kulun ("Köln") e traonienn ar Roen ; dezhañ e oa ur vamm dreistordinal ha kalonek, - un tad, avat, - hag eñ 'Chuin' ha Kuzul-barner, - skañv a galon ha digoustiañs a-walc'h.

Rubens a oa c'hwec'hvet bugel an tiegezh bourc'hiz-se eus Antwerpen ; d'ar gêr-se e tistroio an tiegezh a-hend-all war-lerc'h marv an tad e 1582 ; daoust d'ar c'hañv-se c'hoarvezet abred en deus bet an arzour-mañ ur vuhez brav ha plijus.

Brudet yaouank en en e vro ez a kuit Rubens da Italia e 1600 e-lec'h ez eo staget ouzh servij tiegezh Dukez vMantua. E 1603 ez eo kaset e kannadouriezh gant an Dukez ; en amzer-se e oa sellet ouzh al livourion vrudet evel ouzh tud a-bouez hag implijet e vezent er rouinellerezh (1). Goude marv e vamm e tevio Rubens en dro d'e vro e 1606 hag en em staliañ a raio en Antwerpen. Dimeziñ a ra gant Izabella Brandt, ur plac'h yaouank

kaer ha sioul a voe evitañ ur wreg disi hag a roas dezhañ tri bugel. Ur poltred brav eus al livour hag e bried a ziskouez deomp eurvad ar c'houblad-mañ. Ul labour dibaouez ha laouen a garg e vuhez ; stank e teu an oberennoù meur a zindan e varr-livañ. Donezonet eo e gwirionez.

E 1610 e ro "Gwintadur ar Groaz" en iliz-veur Antwerpen kement a vrud dezhañ ma tered nouspet skoliad d'e stal-livañ ken e ranko ober e annez en un ti brasoc'h, aozet gant lorc'h.

Livet en deus Rubens taolennoù a bep seurt : relijiel, istorel, poltredoù, arvestoù "diwar vuhez ar vulgion". Founnus eo e ijin. E pep stumm eo livet an natur gantañ. Eus 1610 da 1612 e pled gant ur bern testennoù relijiel : "An Diskenn diwar ar Groaz", "Distro ar Mab foran", "Sant Paol troet d'ar Feiz", Adal 1615 betek 1618 e liv dreist-holl arvestoù a hemole'h, 'tudvouch'hed', maouezed noaz ha lartik, a liv o c'hroc'hen gant ar grogen-berlez : "Perseus hag Andromede", "Emgann ar marc'hegourezed". An tudennoù livet gantañ a zo flamank rik ha leun a vuhez. Plijout a ra dezhañ douezez o semplañ, oriadezed orgedus. War un dro e sav taolennoù relijiel bras : "Ar Besketadenn vurzhdus", "Gwerc'hezded" kuilh e-touez ar Sent, e-leiz a "c'hGorroidigezhioù" leun a joa.

E 1622, diwar goulenn 'Mari a vMedicis' e stag gant kinklidigezh "Palez al Luxembourg" e Paris. War-lerc'h marv e wreg e 1626, avat, ez a kuit da Vro-Spagn, evel kannadour adarre, a-berzh an Arc'h-Dug Albert en dro-mañ, o klask disoñjal e c'hlac'har gwirion. E Madrid e liv poltredoù Filip IV hag e diegezh. Degemeret eo neuze gant enor e Lunden e palez Charlez ar C'hentañ.

Ur wech tizhet gantañ pevar bloaz hag hanter-kant ne ra mui nemet labourat evit e oberenn. Addimezet en doa e 1630 gant Helen Fourment, ur plac'h yaouank c'hwetek vloaz, bet anavezet gantañ dija pa zaremprede tiegezh e wreg kentañ, - ha biskoazh ne voe roet kement a vrud d'ur wreg gant he gwaz : ar poltred anezhi a gaver e-barzh holl virdioù Europa hag ar bed ; he dremm

zoken, a anavezet e-barzh taolennoù liesseurt: "Suzanna o kouronkañ", "Betsabea", "Andromede", h.a.

War-lerc'h 1630 e livo Rubens kalz ar maezioù tro-dro d'e gastell a Steen nevezprenet gantañ (2). Kouezhañ a ra klañv avat e 1638 ha mervel a ra daou vloaz goude.

~~~~~

Distroomp da daolenn viridi Roazhon. Souezhet e c'heller bezañ gant he doare hag he zestenn : "O hemolc'hiñ leoned ha tigrèd". Perak seurt liverezh ?

Rubens a blije dezhañ livañ loened. Moarvat e tenne e awenadur eus danevelloù skeudennaouet a oa stank en e levraoueg. Emichañs ivez en deus gwelet loened gouez e-barzh gouezvildioù a oa d'e vignoned pinvidik. Al loened all a wele tro-dro dezhañ en Antwerpen pe e koadoù-meur menezioù Arden. "O hemolc'hiñ leoned ha tigrèd" a voe livet diwar goulenn Dug Bavaria ha taolennoù all heñvel ouzh houmañ a voe graet evit goulennnerion niverusoc'h-niverusañ : "O hemolc'hiñ dourgezeg", "O hemolc'hiñ bleizi", "Daniel e foz al leoned" h.a.

Taolennoù seurt se a voe eskemmet gantañ evit un dastumadenn kizelladurioù gresian ha roman digant Sir Dusley Carleton a oa kannad Bro-Saoz e Haarlem. Dre an testennoù-se e voe anavezet Rubens e Bro-Saoz ha Priñs Kembre - a zeuas da vezañ Charlez ar C'hentañ -- a bre-nas evitañ "O hemolc'hiñ leoned..."

Daoust ma ne ouzer ket pebezh harp en deveze Rubens digant darbarerion ne dermas let al livour biskoazh da lavarout anv e genoberourion, pa veze ret. Da skouer, evit "Prometeus ereet" e 1611-1612 e veneg en ul lizher kaset da gCarleton e ser an treuzvarc'had : "Pemp-kant florin evit ur 'Prometeus ereet war venez Kaokaz'", gant an erer a zebr e avu livet ganin nemet an erer a zo diwar zorn Snyders..." Pe, pelloc'h : "C'hwec'h-kant florin evit un 'hemolc'hadenn' kroget gant va skolidi ; diskouez a ra marc'hegourion ha leoned ha livet eo hervez un daolenn graet ganin evit Dukez vBavaria ; hec'h adlivañ a rin penn-da-benn va unan..."

E-touez e harperion vrudetañ e ranker menegiñ Snyders, arbennigour war liverezh al loened, Van Dyck, Jan Bruegel (lesanvet "a voulouz"), mab Peter.

Ar vuhez a zo bet roet da Rubens en hec'h uhelañ hogen daoust da se ez eo chomet un den eeun ha reizh, madelezhus e-keñver e skolidi, feal da gantañ d'e relijion, d'e familh, d'e vro. Un den desket e oa ivez, barrek da gomz seizh yezh ha graet e studi gantañ e latin. Nac'hañ a reas bepred bezañ sellet evel ur priñs : "Me 'zo un arzour", emezañ, "un den a labour gant e zaouarn evit gounit e vara..."

A-wechoù eo bet kriz ar vuhez evitañ ivez. Meur a gañv poanius en deus gouzañvet : tremenvan e gerent, e wreg kentañ, karet meurbet, e verc'h henañ marvet da drizek vloaz. E berzhioù tad a diegezh a santer o sel-lout ouzh e daolennoù familh. Nag a denerded a zo e-barzh poltred Klara-Serena, steuziet ken abred, Alberz ha Nikolaz, tri bugel an eured kentañ, taolenn e eil wreg Helen gant he bugale, Franz ha Klara-Chann bev-buhezek, livet un tammig evel un damskeud hanter echuet. Tri bugel all a zeu war-lerc'h ar re-mañ a-hend-all : Izabella-Helen, Per-Paol ha Konstanz-Albertina. An hini diwezhañ ne voe ket gwelet gant he zad a oa marvet eizh miz a-raok he ganedigezh.

=====

Kalz a draoù a vefe da gantañ diwar-benn Rubens. An arzour breizhat Langleiz en deus studiet stumm al livour flamank en e levr talvoudus hag anavezet mat er bed a-bezh : "Kalvezerezh al livouriezh dre eoul"; el levr-se end-eeun e ouestl ur pennad leun a ouiziegezh da oberenn Rubens.

Chañs hon eus o kaout seurt pennoberennoù e mir-di Roazhon. Un daolenn a zo heñvel ouzh un nor-zigor war ur bed dianav, burzhodus, en un amzer a zo deuet da vezañ peurbadus. N'eo ket hepken gant daoulagad ar c'horf e tleer sellout ouzh al linennoù-se, an dremmoù-se, al livioù-se rak en tu-hont dezho emañ talvoudegezh

ratozh ar gouarnamant gall a oa deuet betek ar boblañs enta.

Da geñver ar raktres-se eus ar mererezh gall e oa bet savet (adal 1919) ur "c'hComité de défense des intérêts bretons" ma oa an talbenn anezhañ peuzheñvel ouzh hini ar CELIB war-lerc'h an eil brezel. Ar c'hengor-hont avat n'en devoa bezoud kefridiel ebet ; prev-eza-grenn e oa ha c'hoarvezout a rae hepmuiken, emichañs, eus kenskrivagnerion ar gazetenn.

Piv, dres, a oa o plediñ gant ar gazetenn d'an ampoent ? Bez' e oa, eveljust, ar Markiz kozh, de L'Estourbeillon a oa bet ezel eus an "Association Bretonne" ha rener "Kevredigezh Broadel Breizh" ha, dre vras, izili ar gevredigezh-se, na petra, a blede gant ar gazetenn. Anvioù tud anavezet mat dija a sine ar pennadoù anezhi ; Quilgars, lakaomp, en doa kenlabouret gant 'BRITTIA' a-raok ar brezel, dibabet gantañ an armerzh da zanvez e skridoù ; Y. de Coniac, a oa sekretour KBB ; A. Colin, a oa breutaer en Naoned ; Pierre Banet, a oa 'aotreec' war ar gwir, dedennet dreist-holl gant ar c'hudennoù a wiraouriezh ; G. Porteu de la Morandière, genidik ivez eus reter ar vro ; L.D. Guedon ; de Guénegeau ; L. Gautier (eus an "Nouvelliste de Bretagne") ; an Dr. Picquenard, "Barz Nevenoe" ; Bourrin, eus Pornig ; F. Simon, ivez, a voe mouler ha merour ar gazetenn ken e savas c'hoant dezhañ teurel e graban warni : diskarzhet e voe. Ret eo notañ, a-hend-all, e oa ar gazetenn chomlec'hiet ha moulet e Roazhon. De L'estourbeillon a oa o vevañ e Roazhon d'ar mare-se (1). Lavarout a c'heller enta e oa eus luskad ar 'Bretagne Intégrale' ul luskad a vourc'hizion eus rannvroioù Roazhon hag an Naoned.

N'anavezomp ket niver al lennerion. War a seblant

(1) Chomlec'h kentañ : 30 bd. Laennec. E 1926, adal an niverenn 34, 6vet bloavezh, rumm nevez, Eost-Gwengolo, e voe chomlec'hiet e 17 str. Chateaudin ha talbennet evel-henn : 'Bulletin mensuel du Comité de défense des intérêts bretons'.

e oa anezho koumananterion hag int distank a-walc'h moarvat rak meur a wech e ranke ar merour aspediñ ar re-mañ da gas o skodenn, da skouer, war an niverenn 28 eus ar gazetenn, Du-Kerzu 1925 ; adarre, war an niverenn 45 eus Mae-Mezheven 1928. Merkañ a c'heller, a-hend-all, penaos ne zeue ar gazetenn er-maez nemet bep eil miz, war baper dister, hep skeudenn ebet, ha peder pajennad enni hepken peurvuiañ. Ne oa ket harpet kalz ar gelaouenn enta ha se a zo aes da ziskleriañ : re daer e oa evit ar c'hallgarourion ha re wak evit ar vroadelourion a lenne 'Breiz atao'.

Ivez, peseurt mennoziou a oa d'ar "Bretagne intégrale" ? Ar re-mañ a denne, e gwirionez, d'ar vroadelouriezh rannvroelour 'platonek' a oa emdroet tamm ha tamm abaoe deroù ar c'hantved, dreist-holl e-touez kelc'hiadurioù ar gostezenn dehoù hag a gaved ur patrom anezhi e-barzh 'BRITTIA' a-raok ar brezel bed kentañ. Diskleriañ a raed e oa Breizh ur vroad evel Bro-C'hall hogen ne c'houlenned eviti nemet an emvel-estrerezh e diabarzh ur Stad C'hall gevreadel. Bepred e vezed prest da ober gant ar ger 'broadel' ('national'), lakaomp, adal an niverenn gentañ en un droienn seurt-mañ : "la volonté nationale bretonne", e sigur ar raktres gall a denne an Naoned diouzh ar peurrest eus Breizh. War an niverenn 7 (Gouere 1922) e lenner an dro-lavar-mañ a-zivout Breizh : "Sa vie nationale". War an niverenn 8, gwengolo 1922, ez eus anv eus an 'hymne national breton' ; war an niverenn eus Mezheven 1923, eus "notre histoire nationale" ; war an niverenn 25, Mezheven 1925, e oa kel eus 'costumes nationaux' ; war an niverenn 11, Gouere 1923, eus "fête Nationale Bretonne" ; war an niverenn 15, Du 1923, eus "idée sacrée de la nationalité bretonne" hag eus "renationalisation" ; war an niverenn 18, Meurzh 1924, e raed meneg eus ur "c'hConseil de direction de la Nationalité bretonne" hag eus ar stourm renet gant "La Bretagne Intégrale" ha gant "Feiz ha Breiz" e sell da sevel ur "Parti Nationaliste Breton". En niverenn 61, rumm nevez, e vreaetaed a-du gant ur "Parti National" ha stad a raed eus lizhiri Brezhoned o c'houlenn

groñs e ve diazezet ur "Parti National Breton". Pell-oc'h e kaved meneg bepred eus an "Nation Bretonne" ez eo arabat aberzhañ d'ur strollad politikel gall; war an niverenn 20 e tiogeled adarre : "Breizh n'eo ket ur rannvro c'hall a-wechall ; ur vroadelezh ez eo..." Taer e oa zoken troioù-lavar zo implijet gant ar gelaouenn. Lenn a reer, da skouer, war an niverenn 33, miz Gouere 1926, gwerzennoù Kalloc'h :

Piv a vo an den brezel
a roy an trec'h da Vreizh-Izel?

D'ar c'houlz-se, e tro 1926, pa oa Elzasiz o kas o stourm war-raok diouzh o zu, e oa taeraet an emsav en e bezh (evit darn, ivez, da heul diskleriadenn vMonzie maz assure enni "e ranke ar brezhoneg mont da get e sell da unvezhadur Bro-C'hall..."). "La Bretagne intégrale" enta he doa boulc'het un enklask diwar-benn saviad Breizh e-keñver gwir. A-benn goulenñ an emrenerezh evit Breizh en em harped war feuremglev 1532 (1). Kement-se ne oa na nevez na dibaot rak an hevelep tech soñjal a gaved e-touez izili ar "Bleun-Brug" d'an ampoent. Mont a raed betek lavarout - an Dr. Regnault, eus Roazhon, da skouer, - he doa Breizh ar gwir d'en em zispartiañ diouzh Bro-C'hall a-grenn peogwir e oa bet torret feuremglev 1532 gant ar Stad C'hall. An hevelep mennoz a oa difennet gant Porteu de la Morandière. Er pennad-se e responte ar skrivagner da F. Jaffrennou en devoa skrivet en niverenn a-raok ne c'halled ket derc'hel kont eus ar feuremglev unaniñ dre ma oa bet sinet hepken gant noblañsoù ha tud a lezenn ha na zerc'houezent tamm ebet ar vroad en he fezh (gwerinveliour e oa Jaffrennou, e-giz ma ouzer) (2); ret e oa, hervez hemañ, enta, klask un diazez all d'hon arc'hadurioù. Porteu avat a zifenne talvoudegezh

- (1) O tostaat ouzh pevare kantved-ha-bloaz ar feuremglev e oad. Ret eo gwelout amañ ivez levezon an arbennigour breizhat war ar gwir etrevroadel, ar Fur.
(2) Ret eo notañ e c'hoarveze an hevelep tra en holl vroioù d'ar mare-hont.

ar feuremglev hag ouzhpennañ a rae : "La Nation n'at-elle pas le droit de déclarer que le traité de 1532 n'étant plus observé par la France est résceindé, c'est-à-dire, annulé en droit et ne peut-elle demander le rétablissement de sa situation telle qu'elle existait avant la signature de ce contrat de l'Union : une Bretagne libre, vivant indépendante, auprès de la France..."

A-hend-all, en niverenn a-gent (32, Mezheven 1926) e pouezed war "perzh etrevroadel" ar feuremglev ha na c'helle a-se bezañ 'ezrollet' biken (1). Hogen santout a raed ivez pegen lu e oa seurt arc'hadurioù dirak hollc'halloud ar Stad C'hall e Breizh. Rak-se ivez e skrived en niverenn 33 e lizherennoù bras : "La Nation Bretonne ne commencera à sentir le désir d'une juste collaboration de la part de la nation française que lorsque cette dernière sentira que l'autre est réellement en état de s'imposer..." Er bloavezhioù-se e oa taer ar garm broadel e bannoù ar "Bretagne Intégrale" evel e kelaouennoù all e Breizh. Moulañ a raed war an niverenn 34 (Eost-Gwengolo 1926) : "La résurrection d'une patrie ne s'improvise pas..." Hag en niverenn 37 e tiskleried : "Les Nations ont des droits..." (a-raok ul lizher digor d'an Arleviergall Poincarré). Mont a raed zoken betek erbediñ doareoù-oberiañ dispac'hel, stag, e gwirionez, ouzh ur brezel-dispac'h, evel dilenn barnerion ha reiñ galloud dezho er-maez eus mererezh ar Stad C'hall.

Ar spered feuls-se a oa bet broudet, evel m'hon eus merket, gant darvoudoù Elzas hag an heskinerezh a oa deuet da heul. Fromet e oad bet dreist-holl gant prezegenn Poincarré e Strassburg a oa bet "ur garm-brezel a-enep d'an holl vihanniveroù broadel". Ha pelloc'h e tiskleried : "Il n'y a pas qu'en Allemagne qu'il existe des chiffons de papier..." D'ar c'houlz-se ivez e oa bet renet eizh furchadeg e-barzh tiez stourmerion vrezhon, e kêrioù Gwengamp, Kemper ha Roazhon. War-lerc'h kement-se ez embanne ar gelaouenn ur pennad a oa talbennet : "Avertissement à qui de droit" e-lec'h e lakaed

(1) "Prescrit" kv. Prescription.

ar gouarnamant gall war ziwall ouzh ar gasoni a savje diwar seurt heskinerezh. Dalc'houde avat e voe embannet al lezenn a-enep d'an emrenerion. Houmañ, a-hend-all, a oa bet diskuliet gant ar gelaouenn e-barzh an niverenn eus an 9 a viz Gouere 1928 e sigur ur mennad mouezhiet gant ar "c'hComité de défense des intérêts bretons" war an divoud-se. War un niverenn all, a-hend-all, (48, Du-Kerzu 1928) e veneged un arroudenn eus ur pennad embannet war an "Nouvelliste de Bretagne" : "S'il existe en Bretagne un esprit d'indépendance et parfois de révolte, il est créé par les abus de pouvoir intolérables..." (ha komz a raed ivez eus "Catalogne rebelle...") (1)

Daoust da se ha war un dro e chome gwan politikerezh pleustrek ar gelaouenn hag al luskad, dre vras. Peurvuiañ e villiged an disrannouriezh 'stupide' evit en em zidamall ; a-walc'h e vefe d'ar vro, emezeur, un "honnête autonomie". A bep eil e tiskleried na c'houlenned ken nemet un "autonomie financière et administrative..." E 1924, war an niverenn 20 e heted an emrenerezh dindan gwarez Bro-C'hall : "Que la Bretagne ait son Parlement régional..." N'oa d'ober evit se nemet bodañ izili ar pemp kuzul departamant eus Breizh (2). Bepred hag evel boaz e spied kempennadur ar Stad c'hall. E 1926, war an niverenn 31, e kinniged da renerion ar Stad C'hall evel patrom ar Stad helvetiat pe USA, - en abeg da gevreadelezh ar Stadoù-se. E ser prosezoù Kolmar ez annouged an dud e Breizh da sevel a-gevret gant bihanniveroù all ar Stad c'hall un talbenn unanet etre holl ranvroioù "Frañs" evit mirout na vije tamallet d'Elzasiz bezañ harpet gant an Alamaned, e-giz p'o dije bet ar C'hallaoued an disterañ morc'hed da zivru-dañ ha lousañ ar re a sellent evel enebourion. Gwak e oa seurt emzalc'h evel an hini o lakae da reiñ pouez d'ar "gwiskamantoù broadel"; hervez ar gelaouenn

(1) Nac'hañ a reas Kevredigezh Broadel Breizh kemer perzh er gouelioù aozet gant ar gouarnamant gall e Gwened a-benn lidañ pevare kantved-ha-bloaz ar stagidigezh. (2) Seurt raktres a voe kinniget ouzhpenn tregont vloaz war-lerc'h gant ar MOB.

hec'h unan e vije bet hennezh roll an eskoptioù mir-out ar gwiskamantoù-se. Gwall warlerc'hiet e oa brogarouriezh ar "Bretagne intégrale" er c'heñver-se.

E gwirionez e veize renerion an UBB pegen gwan e oa o luskad ha rak-se e klaskent mui pe vui tostaat ouzh al luskadoù all ha sevel un talbenn bennak a-unan ganto. Merkañ a reomp en ur pennad all o devoa klasket mui pe vui en em unaniñ gant ar "Bleun-Brug" un her-radig amzer a-raok ar bloavezhioù tregont. Hogen adal 1923 o doa kinniget aozañ ur "parti national" (1) a vije bet o kevezañ, er pleustr, gant strollad "Breiz Atao" nevez diazezet d'an ampoent, nemet na vije ket bet enebour d'an urzh-vat.

E miz Meurzh 1924 o doa graet an hevelep kinnig a nevez : ret e oa sevel 'poellgor-ren ar vroadelezh vrezhon' ; merkañ a raed ivez adarre e oa emgann an U.R.B. heñvel ouzh hini ar "Bleun-Brug" ; ha komz a raed eus sevel gantañ ur "parti nationaliste breton". Ar c'hinnigoù kenlabour-se ne gavjont heklev ebet e-touez renerion ar "Bleun-Brug" (perak, se a welimp ivez pelloc'h) hogen ret eo notañ ne zilezas ket an UBB he mennadoù unvaniñ evit keloù se. E 1927, d'ar mare ma oa ar "Bleun-Brug" war-nes bezañ enket da heul ar berz lakaet warnañ gant eskob Kemper e venne, ur wech ouzhpenn, diazezañ ul "Ligue des libertés bretonnes" (kv. Nnn 41, Gwengolo-Here 1927) gant an "holl dud a youl vat", e-giz pa rafed politikerezh gant youl-vat hep-ken. Padal, seurt hiraezh d'an unded a oa da veuliñ hag a vire, a-hend-all, ouzh ar "Bretagne Intégrale" a ziskouez kas ouzh emsav "Breiz Atao". Da skouer e rente ar gelaouenn kont eus kendalc'h Kastellin ar P.A.B. (war un dro gant danevellskridoù all diwar-benn luskadoù breizhek all, hogen hep enebiezh ebet ouzh ar P.A.B. kennebeut).

(1) Niverenn 61, Kerzu 1923. Kounomp e oa bet anv a sevel ur "Parti National" e 1913, gant stourmerion vrezhon virelour all nemet ne ginnige an danvez strollad nemet ur raktres rannvroelour, na petra !

E devoud e oa diaes d'an UBB en em glenkañ en un talbenn bennak o vezañ ma oa anezhi aspadenn un emsav mirour ha na glote mui nemeur endev gant emgav kevredigezhel Breizh e palevarzh kentañ an ugentvet kantved. Rak bez' e oa eus U.B.B. ul luskad mirout a seurt gant ar re a baote e deroù ar c'hantved-mañ e Breizh. Kement-se ne lavar ket e lakae U.B.B. distro roue Bro-C'hall war e dron da ziviz kentañ adsavidigezh Vreizh, evel ma rae "Brittia" mui pe vui. Merkañ a rae ar "Bretagne Intégrale" en niverenn 38 (Mae-Mezheven 1927) he devoa ar roueelezh c'hall kement kasoni ouzh Breizh hag ar Republik C'hall end-eeun (nemet e oa muioc'h digor eneberezh houmañ ouzh hor bro.) Dre vras avat e klote emzalc'h politikel U.B.B. gant hini ar gostezenn dehoù gall d'an ampoent. En niverenn 22 (Eost-Gwengolo 1924), goude bezañ graet eus Breizh un drevadenn (Breizh-trevadenn n'eo ket bet ijinet gant UDB eveljust) ez ouzhpenned e vefe a-walc'h "un dornad a dud onest evit serriñ o genoù d'an enebourion hag evit mirout ouzh ar re eus hor c'henvroiz ha na gavont harp ebet, stur ebet, a vont da greskiñ "les rangs révolutionnaires" (1). Ha da heul e skrived :

"La conservation de l'ordre en Bretagne ne peut se faire que sur des bases nationales bretonnes... C'est sur cette idée qu'est bâtie la doctrine du nationalisme breton, la seule qui puisse sauver la Bretagne..."

Kefridi an Emsav e Breizh enta e oa difenn ar Vrezhoned ouzh an Dispac'herion (re 1789 koulz ha re an danvez dispac'h komunour a sponte ar vourc'hizion a neuze) da vare ar "c'hCartel des Gauches" e Bro-C'hall. Kerkoulz all - ha se ne oa ket nevez - e klas-ked unaniñ Feiz ha Breizh nemet en ur stumm a roe lañs dreist-holl d'an elfenn bolitikel. En niverenn 21, Gouere 1924, e c'helled lenn : "Le sentiment religieux breton est une force que nous estimons nécessaire à

(1) Ar ger "révolutionnaire", a lakae da skrijal ar markiz kozh, ne oa ket enorus d'ar mare-se evel maz eo hiziv.

la reconstruction de la Bretagne ; la nationalité bretonne et l'Eglise ont intérêt à ce que le sentiment breton ne disparaisse pas..." En dro-mañ e raed dave da zegouezh Elzas (1). Gwelout a ranker er politikerezh-mañ un dastaol diwar darvoudoù ar politikerezh gall end-eeun rak e 1924 - evel m'hon eus damveneged uhel-oc'hik, - e oa bet kaset kannaded eus an tu-kleiz da Vreudoù Bro-C'hall e Paris. D'ar c'houlz-se enta ne oa ket gwall asur dalc'hidi an 'urzh-vat' e Breizh ha klaska rae U.B.B. reiñ fiziañs dezho evel ma klask UDB reiñ diziañs d'ar gostezenn gleiz c'hall e Breizh en hon amzer. E miz Here-Kerzu 1924 e tiouganed enta : "Quelle illusion ! Nous serions jetés dans la fournaise révolutionnaire plus rapidement que n'importe quelle région !" En niverennoù da heul e pouezed war an hevelep mennozioù. Bepred en niverenn 24, Genver Meurzh 1925, e tioged : "Breizh hag ar gatoligiezh ne reont nemet unnan daoust da gement a lavar 'Breiz Atao' " Hag en niverenn da heul, 25, Ebrel-Mezheven 1925, ez embanned e oa ret derc'hel speredoù ar c'honideion pell diouzh ar "mortelles atteintes révolutionnaires."

A-hend-all, dodennoù hengounel ar gostezenn virour gall a neuze en em ziskoueze e-barzh pajennoù ar gelaouenn. Ober a raed eus an tiegezh, lakaomp, "sichenn hor gouenn", en niverenn 29, Genver-c'hwevrer 1926 (hag ivez en niverenn 34 eus miz Gwengolo 1926 ; en niverenn-se ivez, a-hend-all, e renked al labour e-touez pennañ talvoudoù ar vro). Adarre en niverenn eus Mezheven 1926 ez embanned : "L'Etat parlementaire coûte trop cher..." pezh a ziskouez ne oa ket a-du de L' stourbeillon, evel maz eo kaer gortoz, gant ar renadoù "demokratek". A-hend-all e tamalled itrik-où ar frañmasoned e Breizh ; erfin e veneged komzoù Mussolini dindan an talbenn "komzoù a wirionez" ha da heul e skrived : " Aussi voyons-nous se coaliser contre nous tout ce monde de la fraternité, qui n'est pas fraternelle, de l'égalité, qui n'est pas équitable, et de la liberté, qui n'est que caprice..."

(1) Er bloavezh-se e raed eus Elzasiz ha Breizhiz pouboù c'hoarezed, evel ma komzed eus "fraternité des la Bretagne et des Flandres..."

Daoust maz asured a-hend-all e oa "keal adsav-
idigezh Vreizh unan gant an Urzh, ar Reizhded hag ar
Vuhezegezh-Vat" - a oa ur sturienn awenet gant penn-
anennoù ar gostezenn dehou penn-da-benn - e vane em-
zalc'h U.B.B. forc'hellek a-walc'h. Da skouer, goude
bezañ lavaret : "Le régime parlementaire conduit la
France à la ruine et à toutes les déchéances morales"
e klasked gounit fiziañs an holl Vrezhoned gwitibu-
nan, hep derc'hel kont eus o mennoziou politikel, e-
kerzh an dilennadegoù: "o vezañ maz eo kudenn Vreizh
ur gudenn vroadel en em gav ivez a-us d'an holl strol-
ladoù..." ("Bretagne Intégrale", Nnn 44, Meurzh-Ebrel.
1924).

Ret eo lavarout e oa bet stummet renerion K.B.B.
gant ar gostezenn dehou gall ha brudet e oa an emsav
ivez, neuze, evit bezañ lec'hiet en tu-dehou. Pezh
en diskouez ez eo dres an degouezhadenn dezrevellet
gant ar gelaouenn end-eeun hag a zanevelle penaos e
oa bet taget 'Bleunbrugeron' en Uhelgoat gant 'kom-
unourion ouez'. Ur wech ouzhpenn e oa bet lamet ban-
niel Breizh a dre daouarn an dud e zouge. Moarvat e
ranker gwelout amañ disfiz ha kasoni gallgarourion
vreizhat kelennet gant ar gleizidi c'hall ouzh bro-
garourion vrezhon e oa bet desket dezho kemmeskañ
gant ar virelourion c'hall.

Dre vras e chome teuc'h a-walc'h bruderezh U.
B.B., war ul live elfennel hag izel a-walc'h, brizh-
poblek, daoust ma oa aozet evit un niver distank a-
walc'h a lennerion, goude holl. Gwir eo e vezed taer
pa veze tro, o verkañ, da skouer, e oa Breizh "une
terre d'exploitation", evel un drevadenn ; hogen,
peurvuiñ e oa a-walc'h d'ar skrivagnerion en em
harpañ war vunudoù dister evit diskouez e oa mac'ho-
met Breizh. Menegiñ a raed, lakaomp, e oa dilezet
kanolioù ha porzhioù Breizh ; ez ae ar gwiskamantoù
da get ; ne oa ket kelennet ar yezh ; ne oa ket das-
keitet mat ar c'helc'hparzhioù-mouezhiañ ken e oa
dislañset poblañs Vreizh e-keñver poblañsoù "ar
c'hreisteiz" (ne oa ket dihonet tamm ebet neuze em-
skiant Okkitalia). Diskuliañ a raed gwalenn an divr-

oerezh ha tamall a raed ar gouarnamant gall evit an
tailhoù paeet gant ar gouerion e Breizh. Seurt diskan-
où a vo adkemeret ivez gant "Breiz atao" hag al lusk-
adoù rannvroelour liesseurt etre an daou vrezel. Brud
a veze graet ivez en-dro d'an digollamantoù brezel a
oa bet talet gant na Alamaned d'ar C'hallaoued ha n'o
doa ket ar Vrezhoned tennet an disterañ korvo diouto.
Alies e tistroe "La Bretagne Intégrale" war ar c'hraf-
se (en niverenn 8, Gwengolo 1922, pe 11, Gouere 1923)
en ur bouezañ war niver divent ar Vrezhoned a oa bet
aberrzhet war aoter ar "vammvro" e-pad ar brezel bed
kentañ (hevelep diskan a vo adkemeret gant kevrennoù
liesseurt an emsav etre an daou vrezel ivez). Koulskou-
de, well-wazh, ne raed ket kement-se a drouz en-dro
d'ar c'hudennoù armerzhel nemet, dre zegouezh, lakaomp,
hini greanterezh ar c'hofignonoù e Kernev (Nnn 7, Goue-
re 1922).

A-benn ar fin e c'heller gwelout e chome dispis
ha didaer emzoug ar gostezenn-mañ a oa awenet gant ar
vroadelouriezh rannvroelour. Lavaret hon eus e leuria-
de mat K.B.B. an dehouelezh vreizhat en hor bro ; moar-
vat e tenne an dehouelezh-se un darn eus he dodennoù
eus mennoziadeg ar gostezenn dehou gall. Padal en em
ziforc'he mat diouzh ar gostezenn dehou gall dre ma
nac'he kenlabourat ganti tra ma oa prest er c'hontrol
da sevel un talbenn gant luskadoù all an emsav a oa
enebet outi a-wechoù war dachenn ar politikerezh hol-
lek : ul luskad brogar broadelour a oa anezhañ enta.
Digor e oa spered kenlabourerion ar gelaouenn war
zremmwelioù a chome serret ouzh ar gostezenn dehou
gant peurliesañ. Deuet mat e oa d'ar "Bretagne Inté-
grale" lod, da vihanañ, eus tezennoù Proudhon, ar re
a harpe an enep-stadelouriezh hag ar gevreadelouriezh,
lakaomp ; a-du e oad er "Bretagne Intégrale" gant un
Europa gevreadel. War ar poent-se adarre e oa K.B.B.
breizhat rik war an diwezhadoù, hag a-hend-all, kement
hon eus displeget a dennfe da ziskouez e oa diforc'h
mat ar gostezenn hengounelour breizhat-mañ diouzh ar
gostezenn dehou gall kemplac'h dezhi.

=====

DANEVELLADURIOU

I. KEVREDADOURIEZH AR GRAVEZ

Tro hon eus bet da venegiñ ar gelaouenn 'SOCIAL COMPASS' embannet gant ar greizenn a imbours'h diwar-benn kravez ha kevredigezh' Skol-veur Leuven e Flandrez. An niverenn diwezhañ XII, 3-4, 1975, a zo gouestlet da : "marksouriezh ha kevredadouriezh ar relijion."

Deurus - ne lavaran ket dedennus na bourrus - eo danvez an niverenn-mañ diouzh ma tiskouez e c'hell katoliked zo - peogwir ez eo embannet e framm ur skol-veur gatolik - bezañ degaset da studiañ o relijion diouzh ur savboent estren a-grenn ouzh houmañ, ur savboent hag he distruj a-grenn a-benn ar fin.

Ar pezh a c'hoarvez gant an 'deologourion'-mañ a zo damheñvel ouzh pezh a c'hoarvez gant emsaverion a studife ar yezh evel un danvez skiantel rik hep darempred ebet gant an emsav (se a c'hoarvez meur a wech hogen, dres, ne c'heller ket ober eus ur yezhoniour brezhonek pe geltiek un emsaver dre ret ; e devoud ned eo studi ar yezh evit tud seurt se nemet un albac'henn, skiantel ha gounidus a-wechoù, albac'henn evelkent dre ma n'he deus darempred ebet gant buhez ha tonkad an dud, na talvoudegezh ebet evito.)

Padal, seurt studiadennoù a zo talvoudus a-wechoù diouzh ma anataont an ere a-stag ar gravez hag an Diskuliadur kristen, dre vras, lakaomp, ouzh an istor hag emdro ar sevenadurioù. Komz a ra Doue dre an Istor pe a-dreuz an Istor ha komzet en deus dre istor Israhel hag an Iliz da c'houde. Pezh a damallan enta d'an deologourion a studi ar relijion diouzh ur savboent marksat(1) ez eo darbenn ur meizad

(1) Michel CLEVENOT.- Approches matérialistes de la Bible. Savet eo ar studiadennoù-mañ diwar hentenn F. Belo : "Lecture matérialiste de l'évangile de Marc". (embannet gant ar "Cerf")

eus an istor a zo bet termenet gant enebourion d'ar Feiz kristen (kement-se a vez disoñjet a-ratozh pe dremenet da zister gant kristenion a zo spontet o soñjal e c'hellfent bezañ stlapet en 'anistor' pe en 'utopia' a zo ken gwazh hag an ifern evito). Ur rakgoulenn faoz a zo koulskoude e diazez keal ar 'stourm etre renkadoù' bet lakaet gant ar varksourion da geflusker an istor. Hemañ eo avat ar rakgoulenn : n'eus netra mat na talvoudus en istor hag ar gevredigezh er-maez eus striv an dic'hladiezh da ziazezañ ur gevredigezh reizh end-eeun. Ar vourc'hiziezh (da lavarout eo, ar renkad a zalc'h ar galloud) a zo mac'hom ha drouk dre natur. Gant o zrivliadelezh vrizh tener o deus kroget kristenion zo a dro vriad en damkaniezh kaer-mañ a ro d'an Dic'hladiezh dremm ar C'hrist, den skouerel o c'houzañv ha dismegañset nemet deuet da zieubiñ ar re wasket ha grataet dezhañ an Trec'h h.a. hogen reiñ a reont d'ar welidigezh-se ur ster politikel ha bedel rik, digravezelenta. Anat eo an dañjer, koulskoude : a-benn ar fin ar gravez kristen koulz hag an hini hebraek a ziagent n'o deus kemeret korf ha krouet talvoudoù nemet a-dreuz sevenadurioù a zo kendaonet dres dre maz int gladdalc'h-el, bourc'hiz h.a., ragistorel n'eus forzh penaos o vezañ ma ne grog an istor nemet gant Marks. D'ar mare-se n'eo ket ar C'hrist a zo Profed - ne gomzan ket eus bezañ Doue a zo koulskoude diazez ar gravez kristen - peogwir ez eo bet stummet en ur sevenadur mac'hom a-benn ar fin (e dalvoudoù ne c'hellont bezañ nemet un adsked eus ar sevenadur-se) ha peogwir, ivez, en deus c'hwitet a-benn ar fin gant an adreizh a felle dezhañ kas da benn ; Marks hepken avat a zo ar Profed en deus en egerz alc'hwez ar Baradoz kollet ; alese nec'hamant an 'deologourion' a grog bre-mañ gant 'lennadurioù marksat' pe 'danvezelour' eus ar Bibl hag an Aviel a venegomp en notenn uheloc'h.

Un tamm gwirionez a zo eveljust e seurt burutelladurioù : kiminiadezh an Aviel a zo bet displeberet alies gant ar sevenadurioù m'eo bet enkorfet enno ; patromoù stuzegezhel zo - soñjal a ran, da skouer, er re a oa kinniget er c'hwezekvet kantved gant Jezuisted zo - kv. Pascal - n'o doa ket un darmpred war-eeun gant an Diskuliadur kristen ; an "Haroz" diskouezet evel un uhelskouer gristen n'eo ket kristen e meur a geñver. Hogen an dalc'h n'emañ ket aze : burutelladur ar sevenadurioù kristen a rank bezañ renet diouzh ur savboent kristen, gant ar gristenion o unan, o kemer da ziazez e krog an Istor gant ar C'hrist ha n'eo ket gant Marks. Se ne c'hellint ober avat nemet war-bouez ur gantttroidigezh kristen peurbad ha peurzalc'hus : pouezus bras eo d'ar gristenion anzav ez eo war dachenn ar politikerezh hag ar pleustrevezh kevredigezhel ez eo an aesañ dezho pec'hiñ ; re aes eo engervel retderioù ar politikerezh - evel ma ra a-benn ar fin ar varksourion - evit reizhabegañ ur pleustrevezh politikel mac'hom.

Er mare-mañ avat ez eo drastus evit an Iliz hag ar Feiz ar mennozioù hon eus diskuliet e de-roù ar pennad-mañ rak diazezet int war zaou geal a zo faoz : penaos e c'hell an den bezañ mat hep darmpred ebet gant Doue nag ober dave ebet dezhañ ; ha penaos ivez ez eo an den marksat gouest da salviñ ar bed. Hogen dres ivez, kealiad an Den hervez ar varksourion eo a zo da vurutellañ, da gentañ, rak lemel a ra, peurgent, pep roll istorel talvoudek digant an Iliz hag ar Feiz. Dre se ez eo degaset ar "c'hristen" da zegemer meizad un 'istor denel' rik ha da zegemer ivez talvoudoù denel rik a zo boutin d'an holl dud hag a skarzh enta pep eneberezh etre ar Bed hag an Iliz (bezit dinec'h : n'eo ket prest ken ar gristenion da vezañ merzherion ar Feiz a embannont, sañset) ; sed an arbenn hag ar pal end-eeun : chom hep rankout en em gannañ evel kristen evit mir-out na vijed enebet ouzh dalc'herion ar wirionez istorel a zeu ken aes a-benn da abafiñ ar gristenion

gant o zamalloù pennek).

Ha petra ha piv eo an Den a-hend-all ?
Amañ e kouezhomp en deñvalijenn hag en amsteriegezh rik. N'ouzon ket, me, petra eo an Den. Evel ma lavar re all n'eus ket a Zoue e c'heller lavarout kerkoulz all n'eus ket a Zen ; tud a zo avat, tud a zo hepken, tud a zeu a-benn da dapout ar galloud hag a ra gantañ ar pezh a garont hep bezañ atebek dirak hini daoust ma klaskont hol lakaat da grediñ ar c'hontrol. N'eus ket a Zen, a adlavaromp, - lennit ar pennad embannet e 1973 e-barzh IMBOURC'H diwar-benn ar frammadouriezh - ha dre se penaos e c'hellfe bezañ dieubet ? (1) & (2)

+++++

NOTEENN 1.

Evit resisaat beziadoù ar gudenn e venegan amañ un arroudenn eus ar gelaouenn SOCIAL COM-PASS, p.337 (1975) a ra dave dezho. Lezel a ran al linennadoù-mañ en o saozneg orin :

"Beginning with the fact of once again emphasising the christocentric character of christian religion, passing through a new reflection on the relationship between God as transcendent creator and the world and coming to "atheist theology", don't we find the common denominator of different modern theological investigations precisely in the effort to interpret christianity in such a way that it does not conflict with the humanist self-determination of man ; and furthermore, in the effort to have christianity make strides, not in order to compete with humanism but in order to complete and define it..."

Seurt tezennoù eo a zo difennet e-barzh levrioù Girardi, Kelenner en Ensavadur Katolik e Paris, hag e-barzh levrioù nouspet 'teologour' all, evel Besret e unan, da skouer.

Padal ez eo anat n'en deus Doue ur ster bennak evit mab-den nemet maezo mab-den ur boud trabedel hag estreget kenurz hier ar bed-mañ. A-hend-all ez eo sklaer a-walc'h e c'hell an dud war an douar-mañ dioueriñ Doue pe, kentoc'h, keal Doue.

NOTEENN 2

Ur c'heal ken amsteriek hag hini an Den eo keal an 'Dic'hladiez'. E devoud ned anad an dic'hladiez evel keflusker an Istor nemet adal ma paouez a vezañ 'dic'hladiez' end-eeun. Goleiñ a ra ur seurt termen, koulskoude, ur gesteunenn*eus istor mab-den : skornadur ar galloud e dalc'h ur renkad serret a zevoud, diwar gilwered, enebadur un danvez renkad ren nevez o c'hoari ur roll e rez ar gevredigezh nemet forc'het diouzh ar galloud e unan. Ar pezh a zo nevez en hon amzer ez eo roll ar yoc'hoù e par kevandirioù a-bezh hag eñ dleet da emled an deskadurezh hag ar parlamantouriezh hogen argerzhoù istorel damheñvel ouzh ar re a ya en-dro hiziv an deiz en hor grez a zo c'hoarezet a-hed an istorvezh hep ma wiskjent evit keloù se ar ster a vez roet dezho hiziv gant ar varksourion.

* 'Constante'.

II. EMVEREREZH

Abaoe un nebeut bloavezhioù e vez kont alies gant an Emsav eus "emvererezh" ; kv. talbenn ar FASAB : "Front autonomiste autogestionnaire breton". Bez' ez eo an 'emverouriezh' unan eus dodennoù brudañ ar CFDT (rak-se e ra darn van da grediñ ez eo bet ijinet gant an Iliz evel marc'h-Troia en emsav sokialour) hag ivez eus ar 'gevangevreadelourion' evel disoc'h diwezhañ o c'helennadurezh. Enebet eo, diouzh un tu, ouzh ar c'hreizennerzh demokratel' (da lavarout eo, stadel) e strolladoù komunour an trede etrevroadelenn reolet gant Moskov ha, diouzh un tu all, ouzh kreizennerzh ar gevalaouriezh impalaour etrevroadel.

Pal an emvererezh eo fiziout reolerezh an armerzh en'diaz', da lavarout eo, lec'helaat ar galloud armerzhel ; er c'heñver-se, evel m'hon eus merket, e klot gant tezennoù ar gevangevreadelouriezh

evel m'int bet displeget er gelaouenn-mañ e-barzh levr Jil Ewan "En donvor da Vreizh". Unan eus ar gwellaennoù kevredigezhel degaset gantañ e tlefe bezañ perzhiegezh hag atebegezh al labourerion en embregerezh.

Er broioù kornogat n'anavezomp ket kalz a zegouezhioù m'eo bet lakaet da dalvezout pennaennoù an emverouriezh. Sofñj a zo moarvat eus arnod LIP e Bro-C'hall. E Breizh ez eus bet kaset da benn taolioù-arnod bihan, marteze. Evidon-me em eus klevet anv eus unan e Konk-Kernev war-lerc'h ar brezel, e-lec'h e oa bet diazezet un doare kevelouri tisaverezh gant un nebeut micherourion ; ur broadelour breizhat a oa er penn anezhi hogen en arbenn a ziaesterioù armerzhel ar mare hag ivez, a eneberezh ar PCF a gave dezhañ ne glote ket an arnod-se gant ar stourm etre renkadoù renet gantañ end-eeun. war an dachenn ne dizhas ket an embregerezh-se ober berzh ha dav e voe e zivodañprim a-walc'h. Ret eo lavarout e oa urzhiet ar gevelouri bet meneget ganin en un doare ispisial hag hi bet diazezet gant un toullad micherourion o tegas un tamm kevala nemet a oa harpet gant micherourion all gopret d'ar re gantañ. Ar reizhiad-se a denne un tammig da hini ar pesketaerezh artizanel e deroù ar c'hantved e Gwaien, lakaomp : mestr ar vag a zegase ar c'hevala nemet a gemere div lodenn eus kenderc'had ar peskerezh, unan evitañ hag eben a-benn neveziñ ar benveg-labour, ar peurrest o vezañ rannet etre ar vartoloded.

E-giz m'hon eus lavaret uheloc'h, klotañ a ra an emvererezh armerzhel gant uhelvennad an "dozwerinekaat" (kv. "En Donvor da Vreizh") diouzh matiorre skiant an atebegezh hag ar gred kevredigezhel e-touez ar werin. Padal e vez skoilhet seurt reizhiad

gant diaesterioù ha n'eus bet kavet diskoulm ebet dezho ken er renadoù bourc'hiz-kevalaour ken er renadoù emanvet sokialour.

Er renadoù bourc'hiz-kevalaour n'eus rakwelet netra evit herouezañ hevelep reizhiad. Emañ ar c'hevala etre daouarn ar bankoù, ar meurembregerezhioù unwerzhouriezhek broadel pe etrevroadel. Forzh penaos, ma ro ur gwarant da zellid ar micherour ne oufe e wareziñ diouzh gwallheuliadoù c'hwezh-dic'hwezh ar armerzh kevalaour a varc'had.

Er renadoù sokialour ez asoup ar reizhiad-se ouzh un displavar all. Gant ar 'steuñv' e klaser reoliekaat ar c'henderc'h ha parrat ouzh an dic'hwel a ra e reuz er renadoù kevalaour. Ne glot ket an emvererezh avat gant ur steuñv strizh e dalc'h ar Stad ; rak ezhomm en deus eus un armerzh nevidel evit diogeliñ frankiz al labourerion a zo perc'henn an embregerezh. Erfin, ne ro ar sokialouriezh diskoulm ebet - war a seblant - d'ar c'hevala-loc'hañ. Reolet eo ar bankerezh gant ar Stad ha dre se ez eo hualet an intrudu armerzhel a zlefe bezañ diazez an emvererezh. A-hend-all, sevel a ra kudennoù adal ma anad kevezerezh etre an embregerezhioù a zo bet aotreet gant ar galloud stadel (hini ar bankerezh). E Yougo-Slavia ez eus bet savet diaesterioù a seurt-mañ hag evel m'emañ ar galloud politikel etre daouarn ur Strollad - goude ma tamantfe ar renad ouzh tuadoù a bep seurt hag ouzh an Iliz zoken - e c'hell mirout ouzh strolloù ha n'int ket reolet gantañ a en em ledañ war-bouez kreskiñ o galloud armerzhel ; rak galloud ha levezon eo an armerzh ivez hag o reoliñ an armerzh e reoler ivez ar vuhez politikel, na petra : rak-se ivez n'eus ket da c'hortoz gwir frankiz war an dachenn-se en ur renad sokialour diazezet war ar varskouriezh.

N'eus forzh penaos e c'heller en em c'houlenn ha tu a zo da ziazezañ an emvererezh en ijinerezh pounner pe er meurembregerezhioù kevalaour broadel hag etrevroadel pe sokialour stadel. Beziadus e vefe avat en ur c'hlozarmerzh artizanel lec'hel.

Notomp, ouzhpenn-se, ez eo bet implijet gwengel an emvererezh betek nevez zo gant frankizelourion digristen, awenet pe get gant ar varksouriezh. Bremañ e ra ar CFDT ha strolladoù evel ar PSU e-lec'h en em gav stourmerion bet kristen pe levezonet gant ar gristeniezh bruderezh evit ur seurt reizhiad, hep respont d'ar goulenn hon eus stignet uheloc'h : daoust hag ar c'hedhiniannoù a c'hell kaout intrudu ha frankiz armerzhel (ha politikel war un dro) en ur renad e dalc'h ar varksourion ?

Diwar-benn ar gudenn e c'heller lenn niverenn diwezhañ, 30-31, ar gelaouenn "Autogestion et socialisme", diouzh ur savboent marksour. Skrivagnerion zo a hañval krediñ e vefe tu da ziazezañ ur reizhiad emvererezhel e-barzh meurembregerezhioù a vent vroadel. Ur gudenn c'hrevus a anad, koulskoude, e rez an embregerezhioù ramzel-se : daoust ha bez' e c'heller o c'has en-dro hep goulenn servijoù kalvezourion a bep seurt ? E-lec'h e ren ar c'halvezour avat n'eus mui a werinegezh nag a emvererezh ; an dalc'h a zo aze a-hend-all : perzh pep labourer en un embregerezh n'eo ket kevatal, pe en abeg d'e varregezh pe en abeg d'e amaezh end-eeun.

=====

III. BREIZH. MOON E BREIZH.

Un nebeut darvoudoù ha n'o deus ket un darempred war-eeun gant an emsav a fell deomp menegiñ dre ma tennot da saviad ar gravez en hor bro.

Unan anezho eo tagidigezh sez ar sektenn Moon e Roazhon. Argadet eo bet ar sez-mañ e kreiz kêr gant un nebeut kantadoù a'gleizelourion'; ar re-mañ o deus bannet dre ar prenestr arrebeuri ha dafar bruderezh ar sektenn, ha graet un tantad anezho, un "auto da fe", na petra, gant skridoù heretiked heugus, evel gant skridoù ar Yuzevion ergentaou en trede Reich, pe re ar Brotestanted gwechall gozh e Spagn pe e broioù arall, - nemet evelkent n'eo ket bet plantet Mooniz e-kreiz an tan war ar marc'had, e-giz ma oa ar c'hiz e

Spagn d'ar mare-hont : edo ar re-mañ war o daoulin o pediñ, evit o heskinerion, moarvat ! Skoueriusat arvest, me ' respont deoc'h !

Kentelius eo an darvoudenn-mañ e meur a geñver. Taolet em eus evezh outi dre ma oa bet dibabet ar sektenn evel danvez brudañ a-ziforc'h gant ar yoc'hstlenn abaoe un nebeut sizhunioù. Rak-se e kafen ober dezhi un toullad addisplegoù.

A-zivout ar sektenn hec'h unan ne ouzon ker kalz tra nemet ar pezh am eus lennet, evel an holl er c'hazetennoù pe klevet ha gwelet er skingomz hag er skinwel. Dibarder ar sektenn-se enta a hañval bezañ ar c'hemmesk a ra etre ar relijion hag ar politikerezh enep-komunour. Daoust ha Moon a zo ur fals-profepe un toueller ? Diaes eo gouzout. Falzprofeded a seurt gantañ a gaver, stank, moarvat, er sektennoù relijiel ha politikel a fonn en hor sevenadur dibenn kantved. Pezh a damaller dezhañ dreist-holl - estraget bezañ enep-komunour arloupet - ez eo bezañ graet eus e sektenn un doare urzh relijiel m'eo emroet dezhi a-grenn an izili anezhi : ar re-mañ a sent ouzh pennadurezhioù o iliz "perinde ac cadaver", houmañ sturienn gozh ar Jezuisted a wechall a verkan amañ a-benn notañ e tenn an tamalloù a reer hiziv d'ar sektenn-mañ d'ar re a raed er metou lik d'an urzhioù relijiel dre vras e deroù ar c'hantved e Bro-C'hall (dezho ivez e oa rebechet gwallañ ar speredoù) nemet a zo miret pervezh (pe a zo bet) er c'hantved-mañ penna-benn en hor strolladoù politikel-mesiazel, marksour pe faskour ; e berr gomzoù : ur fanatikouriezh zo eo a zo karezet e sigur ar voonouriezh.

Peogwir ez eus anv a fanatikouriezh ez eo ret anzav koulskoude ez eo houmañ ar gwallberzh ar gwellañ lodet e-touez an holl stourmerion bolitikel hiziv an deiz hag emzalc'h ar fanatiked end-eeun o deus taget sez ar sektenn e Roazhon, oc'h adkavout evel dre natur, koulz lavaret, doareoù-ober an heskinerion eus dec'h pe derc'hent dec'h, a ziskouez ervat pegen aes eo broudañ an dud a-enep da n'eus forzh

petra pe n'eus forzh piv. Ha piv a zo kiriek da gement-se, a-benn ar fin, nemet ar yoc'hstlenn gall kefridiel a gav aesoc'h gwelout ar gleizelourion yaouank o tagañ ur vandennad istrogelled eget pefed-tioù ar Stad c'hall !

Rak daoust ha ken arvarus se e oa ar voonidi yaouank a zo oc'h ober bruderezh e Roazhon er mare-mañ ? Ma vijent e tiskouezje an dra-se ez eo ar re yaouank bepred kizidik ouzh keal ar gravez (ha, marteze, sed pezh a ra aon da fanatiked ar politikerezh a hiziv : evito, kement a zo er-maez eus ar stourm politikel a zo opiom.) Padal ne gredan ket nemeur e ve arvarus bras ar voonidi yaouank a zo o prezeg o aviel e Breizh ha na ouzont ket galleg mat zoken (eus broioù arall e teuont). Moarvat ez eo kasaus spered ar voonadegezh evel hini ar sektennoù dre vras : ne roont lec'h ebet d'ar preder ha d'ar poell na d'ar c'hrouiñ sevenadurel ha kevredigezhel (met kement-se a c'heller tamall ivez d'ar sektennoù politikel ha na reont alies nemet ober bruderezh hag adlavarout bepred an hevelep luganoù). Dre se e ranker lakaat ar re yaouank war ziwall ouzh seurt strolloù kravezel-politikel a gorvo anien relijiel lod anezho e sell d'ur politikerezh amsklaer hag a ra robodoù anezho. Seurt roll avat ne zere ket ouzh fanatiked politikel a seurt gant ar re o deus taget tud yaouank hag a oa, emichañs, digiriek a-grenn d'ar pezh a c'heller tamall da renerion ar sektern.

=====

BOTKIAN

Un istor mantrus eo hini manati Botkian e meur a geñver. Savet gant ur Breizhad brogarour hengounelour, an Tad Alexis Presse, ez eo troët en diwezhañ d'ur bodad a imbourc'h relijiel, dreist-holl avat - evel maz eo ar c'hiz bremañ - evit marksourion gompleset o deus ezhomm eus un traet santimantel

bennak, ha na ouzer ket re vat, a-benn ar fin, ha kristen reizhkred ez eo pe get. Brudet eo bet Botkian er bloavezhioù diwezhañ dreist-holl en abeg da bersonelezh an Tad Besret, warlerc'hiad an Tad Alexis Presse. Hemañ en deus embannet ur pennad amzer zo dija ul levr ma klask ennañ lakaat ar Feiz da glotañ gant kealiadurezh ar bed arnevez hag a zo e dalbenn, na petra : "Libération de l'homme" a denn da azasaat ar gravez kristen ouzh poellégouriezh li-esseurt hon amzer. Seurt arnod a zo gwariet, eveljust, gant un amsteriegezh bennak rak an dec'heriadur eus ar Feiz a zo kinniget d'an danvez kristenion a-du gant ar sevenadur arnevez ne wisk ket dre ret an hevelep ster evit aozerion ar skridoù a nevez-feizoniezh hag an digristenion ez int mennet evito.

A-hervez e oa Botkian ul lec'h kejout etre tud a feiz ha tud difeiz o klask a-gevret ar wirionez. Lakaomp. Ar pezh am eus aon eo na ve ket ar relijion al lec'h kejout, - ar politikerezh 'ar-aogelour', da skouer, ne lavaran ket hag eno, adarre, e vo adkavet an amsteriegezh a ziskulien tuchañtik. Kement-se, eveljust, ne vir ket ouzh herouezzerion al luskad-mañ a reiñ pouez d'o mennad ha kompren a reer e vent fromet gant rakwel diazevidigezh ur gumuniezh a leanezed 'hengounelour' - war a seblant - er manati, ur rakwel hag a zo war var da bourchas danvez un tabut etre kristenion hengounelour endeeun hag arnevezelour er vro.

Ret mat eo anzav n'eo ket kensellet Breizh war-eeun, evel bro, en afer-mañ. Ur brogarour breizhat e oa an Tad Alexis, hon eus lavaret ; padal n'eo ket deuet a-benn da glenkañ e oberenn relijiel e framm an emsav. Marteze ne oa ket gallus ; marteze n'en deus ket klasket a-walc'h. Kavout a ra deomp e vije bet miret gwelloc'h e spered m'en dije lec'hiet e vennad e par an emsav hepken ; rak a Paris, goude holl, eo c'hwezhet ar gwallavel skarnilus he deus disec'het sev Botkian, betek gortoz.

E-keñver Breizh ez eo ret anzav ez eo bet c'hwitadennoù mantrus an daou arnod da adsevel Abatioù breizhat kozh evel Landevenneg ha Botkian dre ma n'oa ket an emsav diorreet a-walc'h evit harpañ seurt mennadoù. Petra ober en ur vro arallekaet hag hevelebekaet ? Anat eo e ranker kregiñ gant ad-savidigezh ar vro rak peseurt buhez relijiel, sevenadurel h.a. en ur gevredigezh ha n'he deus mui skiant anezhi hec'h unan ?

=====
IV. PORTUGAL HA SPAGN.

Ne glever mui komz eus Dispac'h e Portugal abaoe m'en deus graet kazeg arnod an tu-kleiz pellañ da ziazezañ ur renad kleizelour. Er pennadoù hon eus embannet en niverennoù a-gent e kavo al lennerion, marteze, un tamm diskleriadur d'ar pezh a zo c'hoarvezet en diwezh er vro-hont. War a hañval ne oa ket er gevredigezh portugalat danvez un dispac'h a seurt gant hini Albania pe vroioù isdiorreet ar reter pellañ ; re greñv e oa levezon an Iliz c'hoazh, hini ul Lu ivez hag a zalc'he da hengounioù zo, hini ur vihanvourc'hiziezh enebet ouzh an diskoulmoù ezavour (1). Krennus eo bet ivez levezon ar Gevrediniezh europat hag ar C'hornog, dre vras, ma ranke Portugal bezañ gougevanet outo ma felle dezhi tec'hout diouzh an drouziwezh armerzhel.

Termet eo tonkad Spagn ivez gant hec'h ezelegezh pe he danvez ezelegezh er Gevrediniezh europat (hor c'hleizelourion a gav dezho e vo diskoulmet kudennoù hor bro e framm ar c'hwec'hkogn a zo faziet ; e Bruxelles e vez divizet mui-ouzh-mui tonkad ar pep brasañ eus poblañs Vreizh, war dachenn al labour-douar, lakaomp). Hastañ a ra ar riez-hont enta, dindan ren ur roue ha n'en devo ket muioc'h a bouez er vro warc'hoazh eget ur roue saoz, svedat pe izelvroat, da emaozañ ouzh stuz ha sevenadur keitat ar riezoù europat ar muiañ diorreet ; alese, ar meni frankizouriezh a vez lezet en he roll e Spagn diwar vremañ, dizañjer evit ar renad keit ha na vo ket reu-

(1) "Extrémiste". Diwar ez-tañ(ar muiañ pell diouzh ar c'hreiz.

ziet gant un enkadenn armerzhel c'hrevus bennak. Ret eo gwelout evelkent penaos ez eo krog er vro-se ar stourmoù kevredigezhel a seurt gant ar re a gejer ganto e riezoù frankizour ar c'hornog; dreist-holl avat ar re 'latin' hag a zo disoc'het a-wechoù da gadabuilhoù gwadus a seurt gant hini Vitoria(ha notit e sigur se penaos ez eo savet an Iliz a-du gant an diskeladegerion da geñver an darvoudoù-mañ) pe Bilbao en Euskadi.Kement-se a ziskouezfe a-walc'h ez emdro ar gevredigezh spagnat war an hevelep tu hag ar c'hevredigezhioù europat all er Gevrediniezh Armerzhel.

V. BRO-C'HALL.

Emdroadur an tuad kleizelour e Bro-C'hall.

Tra m'en em led an impalaeriezhoù komunour rusian pe sinaat (kv. Indez-Sina, Angola, arnodoù c'hwitet betek henn e Portugal pe er Reter-Nesañ) ez eo burutellet ar gomunouriezh politikel gant kefredourion an tu-kleiz pellañ a ya betek addeveizañ hag adwelout kelennadurezh vMarks e unan. Darn eus ar gefredourion a chom feal da vMarks, moarvat, evel K. Korsch (en e levr "Markouriezh hag enep-dispac'h") pe H. Lefebvre - hemañ dedennet ivez gant mennozioù Nietzsche ; hogen pelloc'h a-gleiz ez eer betek tagañ,n'eo ket Stalin ha Lenin en e raog, hogen, ivez, Marks en deroù.. Unan eus renerion al luskad maoat e Bro-C'hall, A. Glucksmann - en e levr "Ar geginourezh hag an debrer tud" - a zo herr a-walc'h evit diskouez ez eo Marks e unan kirieki d'ar 'Goulagoù' a hiziv. Ha gouzout a reer penaos ez eo bet barnet ar varksouriezh gant ur c'hleizelour kristen evel 'Maurice Clavel' en e emgounlevr diwezhañ.

A-hend-all, evel m'hon eus merket, e klask ar gleizelourion en em zieubiñ diouzh deveizadur ur varksouriezh kempennet gant Lenin evit implij ar bobl. Meneg a reer kentoc'h, en o zouez, eus Proudhon hag e zremmweliadoù a emvererezh (kemendall a ra SAV hag ar FASAB, dre vras) pe Bernstein ha Gramsci.

E Bro-Alamagn ivez, a-gleiz hag a-zehoù ez eo burutellet Marks gant prederourion oc'h aparchantif da skol 'Frankfurt', Max Horkheimer ha Theodor W. Adorno, a vurutell poellegouriezh vMarks e-barzh o oberenn voutin "Daelerezh ar Poell" embannet e galleg e 1974 gant an NRF ; kement-all a ra un alaman all, J. Habermas a ziskouez n'eo ket gouest dezrannerezh Marks da ziskar an nevez-kevalouriezh.

Seurt titouroù a dennan eus ar gelaouenn 'Projet', Kerzu 1975. Diskouez a reont ne zegemer mui kalz eus ar gleizelourion - heretiked, gwir eo, e sell ar gomunourion reizhkred, - Marks evel an Aviel. Moarvat, meizourion damgristen zo, enouestlet el luskadoù "araogelour" a garfe gwelout en tuad-se un diougan eus emdroadur ar rummadoù yaouank war-du savlec'hioù tostoc'h da re ar Feiz kristen. Hogen daoust ha gwirabeget eo ar goanag-se ? Evidon-me ne gredan ket nemeur. Brud en deus gounezet levr diwezhañ Maurice Clavel - ha n'em eus ket lennet a-hend-all - hogen daoust ha troet en deus preder ur stourmer kleizelour bennak war-du ar c'hudennoù "trabedel" a zo e diazez ar Feiz kristen, kaer a vo lavarout ? N'eo ket sur. A-hend-all, burutellerion a seurt se, nagennerion varksour pe led-varksour a gaver ivez er broioù reolet gant galloudoù komunour. Evit ar poent avat n'o deus ket muioc'h a levezon eget an heretiked kristen eus a-raok an disivoud. E gwirionez ne zibouf burutellerezh ar brederourion led- pe ez-varksat war niderezh ebet ; kefredel rik e chom : re bounner eo ivez pouez ar galloudoù pe an ardivinkoù stadel e dalc'h ar strolladoù komunour 'reizhkred' pe 'diazezet'.

Emdroadur ar 'Strollad Komunour Gall'.

Ar pezh a zo bet heverk er vro-mañ e-kerzh ar sizhunvezhioù diwezhañ ez eo bet youl ar Strollad komunour Gall d'en em dremen d'ur strollad sokialour didaer hag eñ o tilezel a-c'houez d'an holl pennaenn "Groñsren an Dic'hladiezh" hag o vouzhat ouzh an Unvaniezh Soviedel e ser diskuliadennoù nevez graet er Yoc'hstlenn a-zivout kampoù-bac'h a vefe oc'h arc'hwelat bepred

er riez-hont. Van a ra enebourion ar Strollad komunour da grediñ n'eo ket gwirion renerion ar 'PCF' oc'h ober hevelep diskleriadurioù. Kredapl bras eo, moarvat, e soñj ar PCF en dilennadegoù da zont, ma ranko keveziñ ouzh ur PS 'demokratel' ; pezh a zo a-bouez evitañ ez eo sachañ ar muiañ a vouezhioù ar gwellañ. Diwar ar preder-se e teu al luganoù nevez a- du gant "difenn ar frankizioù" en anv ar PCF. Diouzh un tu all avat e c'heller soñjal ivez ez eo anatoc'h-anatañ da renerion ar PCF ne vo ket tu dezho diazezañ ur renad komunour hollveliek a zoare gant hini Rusia pe vroioù ar Reter a zo bet diazezet da heul brezelioù kriz hag hollvedel a-wechoù ; ur brezel hollvedel nevez n'eo ket da rakwelout na da rakjediñ en abeg d'an hollzistruj a zeufe diwar implijout an armoù derc'hanel. Ar politikerezh 'kempennelour' renet gant ar PCF enta a glot war un dro gant beziadoù ar politikerezh etrevroadel hag, ivez, moarvat, gant koshadur ar frammoù. Pezh a vuk ar Strollad Komunour Gall enta, er mare-mañ, ez eo terrifñ disfiz gwiskadoù stadelour brogar zo eus ar vourc'hiziezh c'hall ; klask a ra hilligañ o albac'heñ evit dishualded ar vro a-benn gounit un tamm grad-vat eus o ferzh, da vihanañ. An dra-se, a-hend-all, hon eus diskuliet abaoe pellzo.

VI. LIBAN.

Echu eo ar brezel el Liban, ur brezel hag en deus koustet o buhez da viliadoù ha miliadoù a vroiz. Peseurt ster a zo bet d'ar brezel-se enta ?

Er c'helaouennoù hag er c'hazetennoù gall, koulz hag er yoc'hstlenn dre vras, ez eo bet diskouezet ar brezel-mañ evel ur c'henstok etre 'araogelourion' ha 'mirelourion', etre 'bourc'hizion' ha 'dic'hladidi' h.a. Daoust ha klotañ a ra an termenadur-se gant ur gwirvoud bennak pe daoust hag ur vojenn eo ?

Evit kompren un tammig pezh a zo c'hoarvezet ez eo ret kounañ ez eo Liban ur Riez kalvezadel, amparet diwar genelioù liesseurt a zo bet enebet kenetrezo gwechall ; pouez an istor a chom avat (se a wirier bemdez en Iwerzhon, da skouer) hag ar stourm etre renkadoù anervez ne ra alies nemet gwiskañ ur stumm nevez da

genstokoù kantvedel.

Da heul un istor o sevel betek ar grennamzer ez eus bet bodet en ur vro vihan kumuniezhoù muzulmat ha kristen gelenek an eil ouzh eben, moarvat, hogen rannet ivez e diabarzh pep rumm. Rouestlet eo bet ar gudenn gant donedigezh hag annezidigezh repuidi a bep seurt : Armeniz ha Palestiniz peurgent. A bep eil e kaver enta, diouzh un tu, Maronitiz, kristenion anezho, koulz hag Armeniz, ha diouzh un tu all ranncredennidi vuzulmat a bep seurt, Chiiz, Druziz, Sunniz h.a., pep ranncredenn o klotañ gant ur c'henderere bennak (un tammig evel ma c'hoarvez e Kembre e-lec'h e klot ar ranncredennoù protestant, mui pe vui, gant kenderereoù diforc'h). E-touez Muzulmiz ez eo C'hiiz ar re baourañ hag izelañ o stad, anezho kouerion korvoet gant perc'henned kristen, moarvat, hogen ken alies all - ha garvoc'h - gant perc'henned vuzulmat, Sunniz anezho, peurgent.

A-hend-all e ouzer ez eus diwanet un nevez-vourc'hiziezh er vro-hont, da heul an diorreadur armerzhel devoudet gant ur gevalaouriezh ouez. Eus ar gennez-se o deus tennet o mad Maronitiz hag Armeniz, - ar re-mañ repuidi evel Palestiniz nemet deuet mat a-benn d'en em ziluziañ en aferioù hag enframmet mat er vro diwar vremañ, - nemet ivez Muzulmiz, Sunniz ha Druziz anezho dreist-holl. Evel dic'hladidi ne chom enta nemet darn eus C'hiiz ha, na petra, Palestiniz, ar re-mañ avat, c'hwitet ganto o brezel-dieubiñ, dalc'het a-ratozh gant o renerion en ur saviad a repuidi, gant kenwall ar riez-où arabek all a implij anezho evit gwaskañ Israhel, hep lodañ, evit keloù se, mennadoù sokialour dispac'hel ar gefredourion araogelour a fell dezho ober eus ar boblad korkerion-se Lu an Dispac'h Dic'hldel er Reter Nesañ(1). Rouestlet eo ar saviad-mañ gant daou dra. Sterniet eo lu an dispac'herion gant kefredourion vourc'hiz diouzh un tu, kristen darn anezho, o tegas dre ret o speredeg-ezh renkad er stourm a gasont da benn : blenier an emsav araogelour a-hont, Kamal Joumblatt, a zo anezhañ ur

(1) Tu a vije bet da enframman palestinez er riezoù kenharz, seul vui ma n'o deus merk kenelel a-ziforc'h ebet, o vezañ ma komzont arabeg evel pobloù arabek all ar reter nesañ.

c'hefredour druzat, kemeret gantañ un tañva eus relijionoù a bep seurt nemet degemeret gantañ, a-benn ar fin, ur meni indezadegzh temzet gant ar varksouriezh (nemet ar c'hontrol e vefe). Diouzh un tu all e chom Maronitiz emskiantek tre evel pobl hag emouez ouzh o istor hag o ferzhioù kenel (notomp o deus graet berzh en amaezhiad-urezh-stad ; boaz eo o bugale da ober studioù, war ar maez ievz, un tamm evel e Breizh) ha moarvat o deus en em savet (rak int o deus kemeret intrudu an darsav) evit diogeliñ o dazont evel pobl. En arvar emaint diwar vennadoù impalaour Arabiz er rannved-se dre ma arnod ar re-mañ bep an amzer kevren ar Stad libanat ouzh un dreiststad libanat-siriatic, egiptat-palestinat e-lec'h e kollfent o hiniennelezh hag o gwirioù pobl. Moarvat ez eo anienel stourm ar gristenion a-hont ; n'eo ket renet gant un dezrannadur pizh eus saviad politikel o rannved ; met daoust ma ra an digevatalded hag ar c'horvoerezh re alies o reuz el Liban - ne reont ket gwashoc'h koulskoude eget en ur vro emanvet sokialour evel Irak, enebour Kurdiz - e vefe direizh tamall dezho bezañ hepken kilstourmerion dall.

=====

VI. ANGOLA HA MOSAMBIKE.

Diwar vremañ ez eus bet lakaet fin d'ar brezel diabarzh en Angola ha trec'h eo hiziv ar gostezenn harpet gant ar Rusianed ha Kubiz. Daoust ha tennañ a ray ar Rusianed kalz mad eus an drec'hadenn-se ? Moarvat e c'hellint e-pad ur pennad reoliñ ur vro he devo ezhomm eus o skoazell hag a rankint skorañ hogen kredapl bras eo ivez ned eo ar gealiadurezh varksat evit renerion ar c'hostezennoù o kenstourm er mare-mañ er ranndir-hont nemet un tu da guzhat enebiezhoù personel etre danvez mistri hag un dro da skarat arvelloù etre kenelioù ha meuriadoù, ha da gafunañ anezho ivez. Iskis a-walc'h e oa evelkent gwiriañ e oa unanet diouzh un tu Kubiz ha Rusianed ha, diouzh un tu all, Amerikaned, Suafrikiz ha sinagarourion, pezh a ziskouez e c'hoari

ar ranncredennoù marksat hiziv roll ar ranncredennoù kristen en amzer diazezidigezh ar riezoù impalaour kentañ en Europa er c'hwezekvet kantved, evit pourchas ur gealiadurezh d'an danvez galloudoù.

Ar varksouriezh, drezi hec'h unan, ne ziskoulm ket gwelloc'h ar c'henstokoù etre riezoù eget ar gristeniezh hec'h unan gwechall. Skouer all : Vietnam oc'h emellout e politikerezh ar broioù marksat kenharz dezhi ha prest, diouzh ret, da enebañ ouzh Sina evit derc'hel he reolerezh war inizi zo a garfe Sina stagañ ouzh he ziriegezh(1).

(1)

Lenn a reomp war ar gazetenn "Süddeutsche Zeitung" emañ e soñj an UNITA hag an MPLA kregiñ gant ur brezel strouezheg hogen daoust ha n'eo ket dinatur kevredadur an daou aozadur-se ? Notomp he deus Portugal'kedanavet' Riez rudiangar Angola.

Aheurterezh renad kozh ar Portugal n'en devo ket servijet da galz tra, na da zerc'hel en he sav an impalaeriezh a zlee, a-hervez, padout da viken, na da ziwall an impalaeriezh-se diouzh ar varksouriezh, ar pezh a zleje bezañ bet pal kentañ ur renad mirelour a seurt gant hennezh. E gwirionez, ar brezel en deus renet a-enep d'an emsavididi n'en devo graet nemet reiñ tro dezho da grouiñ armeoù dispac'hel.

Maz eo troet ar brezel en Angola a-du gant ar gomunourion harpet gant Rusiaez eo disheñvel ar gont e Mosambike. Er ranndir-hont ez eo bet trec'h ar FRELIMO reolet gant maogarourion. E penn an aozadur-mañ emañ Samora Machell, un doare"blenier"dre c'hraes Doue(pe an Diaoul, kentoc'h, moarvat!) hag hemañ a seurt gant Amin Dada evitañ da chom hep bezañ ken brudet hag e genseurt.

Ret eo lavarout amañ adarre ne dalvezket ar vaouriezh kalz tra en ur ranndir divent, 9 000 000 a gouerion ennañ, dizesk, anat eo, an darn-vuiañ anezho ; a frammoù n'eus ket nemet ar re a zo pourchaset gant ar nevez-vihanvourc'hizion - 40.000 anezho - ha n'int ket chalet tre na gant mennozioù na gant kelennadurezh na gant kealiadurezh, nemet a zo c'hoantek, na petra, da dennañ mad eus ar galloud degouezhet dezho hep nemeur a drubuilh hag e chal, diwar vremañ, da zarnaouiñ keretrezo kargoù ha leveoù, evel e meur a riez afrikan arall.

Kriz eo bet ar mac'herezh a-enep d'an eneb-erion pe an digemplegerion war-lerc'h kemeridigezh ar galloud gant ar FRELIMO ; akedet en deus ar "Gwazerezh Broadel Gwerinel a Ziogelroez" ma vije leun chouk ar c'harc'haroù gant"enebourion ar bobl" ; ken evedus ha ken doujet eo ar gwazerezhkerreizh-se hag an hini a oa reolet gant Portugaliz a-ziagent. Diskarzhadegoù a ra o reuz bep an amzer e-touez izili ar FRELIMO e unan, evel ur pezh-c'hoari ragaozet e pep renad dispac'hel. Deneliezhus a-walc'h eo rener ar Stad peogwir en deus nevez roet urzh da zivac'hañ kantadoù a brizonidi hogen, evel ma c'hoarvez alies e seurt renadoù, n'emañ ket ar galloud gwerc'hek gantañ : un den en e unan e chom ha n'en deus ket krog, war-eeun, e ardivink ar Stad.

O c'hortoz ha da heul kimiad Europiz a zo tec'het kuit diouzh ar vro evel m'o deus tec'het a-gent diouzh Aljeria e reuz ar Riez nevez ouzh un enkadenn armerzhel c'hrevus. Koazhet eo ar c'henderc'h eus 75%. A c'hell bezañ e teuy ar renad a-benn da grouiñ frammoù nevez talvoudek. Padal e vo skoilhet gant an diouer a dud skoliet hag ivez gant ec'honder ur ranndir ha na vaste ket mat d'e ezhommoù d'ar c'houlz m'eo bet aotreet dezhañ an dishualded.

+++++

VIII. KAMBODIA.

Er wask prendeziek ez eus bet embannet nevez zo un toullad pennadoù ha danevelladurioù diwar-benn saviad politikel ha kevredigezhel ar vro-hont

a zo bet aloubet gant an nerzhoù komunour warlene. War a hañval ez a endro enni ur gwaskerezh kriz a-enep da eneberion ar renad, pe d'an danvez eneberion pe, c'hoazh, d'ar re a vefe warno diskred bezañ enebourion. Kontañ a reer e vije bet diboblet a-grenn ar gêrbenn ha diouennet ar vroad a-benn diogeliñ aesoc'h trec'h ar Vertuz Komunour.

Start eo barn an testenioù a roer deomp hag a zo distalet, eveljust, gant ar gleizelourion a-du gant Vietnam ha Kambodia (paotred an trede etrevroad elenn n'int ket chalet kement gant ar pezh a c'hoarvez er broioù re nes da Sina, moarvat). Dija d'ar mare ma oa bet nevez gounezet an trec'h gant Kambodiiz Ruz em boa bet tro da zivizout gant un ezel eus ESB a-zivout an darvoudoù-se ; neuze avat evel hiziv e veze graet ar rebech a grizder dizamant ouzh an dispac'herion hag ar rebech-se, na petra, a oa distalet gant an ehesbead-se, gant ken dister abeg moarvat ha ma oa degemeret gant re all.

Evidon-me e kavan un tamm hegasus abafted pilpouz lod kleizelourion pa vez anv a grizderioù sevenet er broioù bet gounezet d'ar pezh a anvont an Dispac'h. Diouzh un tu ez eo a-walc'h braslenn istor diazezidigezh ar renad komunour e Rusia etre 1917 ha 1937 evit merzout peseurt priz en deus koustet d'ar werin staliadur ar sokialouriezh er rannved-se, da geñver adaoz ar glad h.a. Sifroù a zo diwar-benn se hag ar Goulagoù n'int ket romantoù.

Ivez, en anv peseurt divezouriezh e c'hell an holl re-se enebifñ implij ar "feulster dispac'hel". Adal ma varn renerion an dispac'h ez eo didec'hus hag hollret seurt "feulster" e teu, war an taol, da vezañ santel, peogwir e kas an Dispac'h da benn.

E gwirionez ez eo stag ar feulster war un dro ouzh lorc'h ar re a zalc'h ar galloud - e degouezh mirelourion a fell dezho 'mirout' ar galloud ; hogen, dres ivez, kement dispac'her graet berzh gantañ a zeu da vezañ mirour - hag ivez ouzh stuz ar gevredigezh ; aesoc'h eo d'ar sponterezh stadel c'hoari en ur vroad isdiorre, stank enni an dud dizesk, evel e Kambodia

pe e Mosambike pe er broadoù maz eo kreñv enno an henvoaz impalaour stadel (Rusia h.a.) : lorc'h ar galloud stadel eo a zo kiriek eno evel er broioù komunour pe faskour.

E Mosambike evel e Kambodia, avat, lakaomp, e kaver,ouzhpenn-se, engroezioù a gouerion dizesk a zo disprizet, er Pleustr, gant ar varksourion, dezho un tamm deskamant, a gav er varksouriezh end-eeun ur benveg kefredel azas ouzh ar galloud a fell dezho embreger (peurgant e damkaniezh "groñsren an Dic'hladiezh".)

N'eus forzh penaos ez eo diaes kompren perak e fell d'ar gleizelourion gornogat kemer da batrom dispac'hoù ha na vo ket tu, hep mar ebet, da seveniñ en hor broioù diorre, ha greantel eus ar C'hornog.

#####

SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK

Kendalc'h etrekeltiek 1976 a vezo dalc'het en Enez-Vanav eus an 19 d'ar 24 a viz Ebrel.

Kaoz a vo er c'hendalc'h-se eus dazont ar bloavezhioù '80.

Ur vro gaer-tre eo Bro-Vanav, hogen leun a douristed saoz e-pad an hañv. Plijusoc'h eo da welout da vare Paskevit kejañ gant tud ar vro.

Ne vo ket kendalc'h Manav unan bras moarvat. Koulskoude e vefe mat ez afe un toullad Bretoned aze da anavezout ar vro hag an dud ha daremprediñ Kelted all a bep bro.

E soñj emañ ar C'hendalc'h da aozañ ur veaj evit ur priz dereat, war-dro 340 lur gall. Izeloc'h e vefe ar priz dindan 21 bloaz. Gant al lojeiz e savfe da 585 lur. Tu a zo da resev diskleriadurioù hiroc'h o skrivañ da :

"KENDALC'H KELTIEK"n L. Chapel, Roc'h ar Bleiz,
29 210 - MONTRULEZ.



NOTENNOU DIWAR-BENN ARMERZH BREIZH

1. CELIB.

Ar stroll-mañ en deus nevez embannet un diskl-eriadenn o lakaat ar gouarnamant gall war ziwall ouzh heuliadoù e aheurtterezh o nac'hañ pep adaoz war dachenn ar'galloud rannvroel'.

2. GWIZURIEG.

Ar C.P.I.O. ("Compagnie des produits industriels de l'Ouest"), adembregenn ar gronn "Renault" he deus diazezet e Gwizurieg ur greanti evit kenderc'hañ pezhioù e kaoutchoug moulet evit ar c'hirri-tan. Kregiñ a ray da vont en-dro e 1977 hag e roio implij da 250 a dud e 1978 ha da 350 e 1980, hervez a jeder. Kevala ur seurt embregenn a chom gall hag evezhiañ a c'heller penaos emañ staliet e reter pellañ ar vro.

3. FELGER.

En eneb n'eus bet kavet diskoulm ebet da enkadenn gre: terezh ar boteier e Felger. Gouzout a reer ez eo bet devoudet an enkadenn-mañ, - evel hini ar gwin en Okitania - gant diwerzhekadur al 'Lira' italian, pezh a ziskouez n'eo ket fur evit greanterezh ur vro bezañ amzalc'het gant un nevid ha n'en deus krog ebet ennañ. Greanterezh Breizh a zlefe talvezout, da gentañ, da vostañ da ezhommoù ar Vrezhoned.

4. ENKADENN AR PESKETAEREZH E BREIZH E 1976

Breizh a bourchas 41% eus kenderc'h ar pesketaerezh e 'Frañs', hag a zo savet betek 282 000 tonennad e 1974 (1.113 milion a lurioù gall).

Padal ez eo gwallemdroet saviad ar pesketaerezh e Breizh :

- diouzh un tu ez eo digresket kalz niver ar besketourion (5.000 nebutoc'h a vartoloded, elese, un digresk a 28%) ;

- arnevesaet kalz eo bet ar strollad bigi-pesketa ; diwar vremañ, 40% anezhañ a zo amparet gant bigi a zo dezho en tu-hont da 250 tonnellad(chaluterioù

anezho aveet gant un teurkadur-pesketa staliet en aros ar vag ha dezho kaliou-skornañ ; steuziañ a ra enta an artizalenelezh ha dont a ra ar pesketaerezh da vezañ mui-ouzh-mui e dalc'h ar c'hevala (breizhat, gall pe etrevr-oadel, se a vefe sa wiriañ) ;
- ar strollad bigi perc'hennet gant an artizaned a zo krog da neveziañ.

Lec'hiet eo ar porzhioù-pesketa an oberiantañ e Breizh war aod ar c'hreisteiz.

War aod an hanternoz n'eus nemet Sant-Malo a gement en defe ur pouez bennak (5 chaluter-skornañ evit ar moru) ; nevez zo ez eo troet Sant-Malo war-du ar pesked fresk (2.700 tonennad e 1974 diwar 4 500 tonennad en Aodoù-an-Hanternoz penn-da-benn ; ouzh ar c'henderc'h-se e ranker stagañ 62 000 tonennad a gretegened.

A-benn ar fin, kentoc'h eget diwar ar pesketaerezh e unan e tenn aod an hanternoz e Breizh gounid diwar an istraerezh pe ar mesklaerezh ; war an aod-se ivez e vez dastumet bezhin ha'maerl'.

War aod ar c'hreisteiz avat emañ ar porzhioù pesketa pouezusañ :

- An Oriant (77 000 tonennad pesked ha krestegened) ; eil porzh brasañ 'Frañs' ez eo an Oriant evit ar c'henderc'h-se) ;

- Konk-Kernev (57 000 tonennad hep kotañ ar pesked diskarget en Afrika Zu) ;

- Douarnenez (18 000 tonennad).

Ha ret eo menegiñ, ouzhpenn, ar Gelveneg, Kameled ha Gwaien.

A-hend-all, setu un daolenn a roio da welout stad ar pesketaerezh e Breizh e 1974 :

		Dregantad e 'Frañs'
Niver ar besketaerion (oc'h enderc'hel kreginaerion)	19.600	41%
Niver ar bigi	4.500	34%
Niver ar bigi dreist da 250 tonnellad	94	54%
Tonnelladur kev an bigi	133 500	46%

		Dregantad e 'Frañs'
Pesked		
◦ Kementad	196,0*	41%
◦ Talvoudegezh	728,5**	
Krestegened		
◦ Kementad	19,8*	67%
◦ Talvoudegezh	140,7**	65%
Istr, kregin, meskl		
◦ Kementad	48,9*	32%
◦ Talvoudegezh	229,7**	29%
Plant-mor		
◦ Kementad	14,6*	
◦ Talvoudegezh	5,7**	
Sifoc'hed, morgad, teuroged		
◦ Kementad	2,6*	
◦ Talvoudegezh	8,8**	

* Dre vil tonennad.

** Dre vilionoù a lurioù gall.

Notenn.

Tennet eo ar sifroù-mañ eus ar gelaouenn "Marine Marchande" meneget gant "Entreprises de l'Ouest industriel" Here-Du 1975. Moarvat ez eus anv enno eus Breizh-steuñv. Ret vefe atodiñ enta sifroù eus rannvro an Naoned.

ADDISPLEG

Enkadenn ar pesketaerezh e Breizh a zo devoudet gant meur a abeg :

- diouer a reoliadur unvan e rez "Kevrediniez Armerzhel Europa" ; pesketourion Vreizh enframmet er Stad c'hall n'int ket harpet evel maz eo pesketourion broioù arall emezelet er Gevrediniez (30% pe 40% eus ar c'hevala ret evit pourchas ur vag a vez pourchaset d'ar re a fell dezho ober peskerezh ha n'eur ket ken strizh, a-hend-all, evit pezh a sell ouzh doare ar pesked divourzhet) ;

- Ar gemmañ a ra ar prizioù kenderc'h etre ur c'hement ha daougement, hervez ar porzhioù, e par Frañs pe K.A.E. ;

Tu a zo, eveljust, dawellaat ar yezhadur hag ar geriadur hogen ne c'hellfe seurt adreizhadur bezañ kaset da bennvat nemet gant un Akademiezh hag houmañ n'eus ket anezhi evit ar poent ; re zister eo niver ar skrivagnerion hag al lennerion evit ma tinodfe eus o c'hreiz ur c'hedveno hag ur c'hedimplij gwirion. O c'hortoz enta ma vo diorreet a-walc'h hor yezh evit aotren savidigezh un Akademiezh wirion ez eo gwel d'ar skrivagnerion - hag a zo digenvezet pep hini diouzh e du - chom hep kemm netra ez yezh diazezet gant Vallee ha GWALARN, nemet war un nebeudig bihan a boentoù. Ne vefe ket fall, koulskoude, sevel e ser pep kelaouenn a studi ur c'hengor-yezh a ziwallfe da unvaniñ arver ar skrivagnerion o sevel pennadoù evit ar gelaouenn ha gallus e vefe goude-se bodañ ar c'hengorioù-se war ur bazenn uheloc'h ; n'omp ket erru er par-se c'hoazh, avat.

Evit pezh a sell ouzh an Iliz ne gavan ket kalz tra kennebeut da ouzhpennañ d'ar pezh en deus displeget Jil Ewan. Eveltañ e soñjan ne oa ket - ha n'eo ket - mat ur c'henemglev re strizh etre an Iliz hag ar Stad (anv a zo, avat, e-barzh oberenn Jil Ewan eus ar Stad hengounelour dreist-holl, er broioù 'latin' peurgent) a zisoc'h da sujañ an Iliz d'ar Stad ha d'he c'hontammañ dre implij ar galloud stadel end-eeun ; aberzhet eo bet Breizh ha broadoù trec'het all gant an Iliz da ezhommoù ur 'Realpolitik' hag a oa berrwel a-walc'h a-wechoù. Un dra vat e c'hell bezañ enta ar frankiz politikel a zo lezet hiziv d'ar gristenion hag anat eo e c'hell ar re-mañ iveze Breizh ober o mad eus ar frankiz-se en hon amzer evit labourat da adsevel e Breizh un Iliz a vo damantus da wrioù pobl Vreizh war bep tachenn. Diouzh un tu all ne c'hell ket aotrouniezh an Iliz en hor grez kennebeut bezañ embreget en hevelep doare ha gwechall o vezañ ma n'eo ket mui an deskadurezh, zoken war dachenn ar Feiz, brient ar gloer nemetken ; un islonk a zo, e par ar gevredadoniezh end-eeun, etre feizidi an naontekvet kantved

ha re an ugentvet kantved. Aferioù an Iliz ne c'hellont mui bezañ meret gant ar gloer hepken. Hogen ret mat eo gwelout an dañjerioù a zo kuzhet er saviad nevez-mañ a c'hoarvez war un dro eus dilezidigezh o galvedigezh gant ul lodenn eus ar gloer, ar re-mañ o treiñ da stourmerion bolitikel pe da gefredourion (hag an dra-se, siwazh, a c'hoarvez, eveljust, er rummad yaouank) hag ivez eus intruduioù hag emelloù al liked o krouiñ strolloù ha kedhinienoù kravezel hep darempred ebet gant ur framm hag a zo prest ivez da reiñ e zilez ; hep kontañ, eveljust, digristenadur, digravezadur ha dinevetadu ar gevredigezh kevan hag a dizh, hep gouzout dezho, ar re a ra anezho kristenion. Me a anzav e ro ar saviad a vremañ evel m'emañ kalz muioc'h tro d'en em chalañ eget da c'hoanagiñ, zoken war dachenn an emsav hag ar Feiz ma klask hinienoù pleustriñ warni hiziv. An emsaverion gristen a rank liammañ o mennad da adsevel ar Feiz ouzh diorreadur an emsav e unan ; hemañ avat a chom dister e nerzh evit ar poent ha war ar marc'had, diouzh maz eus anezhañ ez eo enebet pe ziseblant ouzh ar gravez ; ha padal, peseurt hent all dibab adal maz omp emsaverion ? Hep rakwel politikel ez eo barnet an Iliz d'ar marv (se a zisoñj ar c'helc'hiadoù hengounelour pe gleiz-elour kristen en hor bro ; ne reont nemet prientiñ un doare 'Iliz kozh' evel maz eus bet en naontekvet kantved hag a zo steuziet hiziv). Kement-se a lavar hepken e ranko ar gristenion sammañ o unan n'eo ket adsavidigezh an Iliz e Breizh nemetken, hogen ivez hini ur gumuniezh politikel, da lavarout eo, ur vroad vrezhon el ledenez-mañ, ma fell dezho tec'hout diouzh ar geto emañ lod o prientiñ dezho. Bez' e ranko an emsaverion loc'hañ diouzh an derez 'mann'evit adsevel ar vroadelezh koulz hag ar Feiz er vro-mañ. Er retder-mañ avat ne gavan-me abeg ebet da laouenaat rak n'omp ket sur e tisoc'himp gant hor mennad, na da adsevel ar yezh na da adsevel ar Feiz, daoust ma anzavan ez eus roet deomp hiziv, evel emsaverion ha kristenion, ur frankiz ha n'hor boa en em vataet anezhi biskoazh betek henn. Goanagiñ a c'hellomp, hep bezañ sur, e vo gwelloc'h ar gevredigezh hag an Iliz e Breizh eget n'int bet biskoazh ; ur goanag, avat, n'eo ket un diogel ha rak-se ez adlavar an n'hon eus abeg ebet da laouenaat na gant kollidigezh ar yezh hengounel na gant kollidigezh ar Feiz hengounel ; ar re-mañ, forzh penaos, a chomo bepred an diazez.

Evit pezh a sell ouzh ar gevangevreadelouriezh hec'h unan e kredan ez eo ret diforc'hañ daou rumm kudennoù.

Unan a sell ouzh diazezoù ar gevangevreadelouriezh. Daoust ma n'eo ket kement-se diskleriet fraezher skrid ez eo sklaer a-walc'h ez eo diazezet ar gevreadelouriezh war un doare hidenelouriezh a c'hell klotañ aes gant ar Feiz kristen. Padal eo ret anzav e c'hellfe er pleustr bezañ degemeret kerkoulz gant anvelourion digristen pe zizoue a ra eus an hinienn peurdalvoud ha finvez nemeto pep politikerezh ; bez' e c'hell ivez diabell-weled ar gevangevreadelouriezh klotañ gant prantad diwezhel ar "gevunouriezh" pa ne vo mui ar politikerezh nemet 'dinazelerezh', eleze, melestradur an traoù e-lec'h melestradur an dud ; d'ar c'houlz-se e tlefe ar strolladoù komunour ha 'groñsren an Dic'hladiezh' steuziañ a zivar an hollved kanttroet d'ar "gevunouriezh". Ret eo anzav avat (ha se a zo bet lavaret gant perzhidi zo eus 'Devezhioù Studi K.B.' e Kistinid e dibenn ar bloaz diwezhañ)e chom ar welidigezh-se eus ar gevredigezh e par an utopegezh hag ur goanag "heulavelour" (1). Se a zo koulz ha lavarout ne c'hell den ebet bezañ enebet ouzh hevelep uhelpal a c'hell bezañ buket gant denelourion a bep seurt koulz ha gant kristenion... o tegemer an denelouriezh. An holl a rank bezañ a-du gantañ evel m'emeur a-du gant ar baradoz.

Setu dres avat gwander pennañ ur gelennadurezh evel ar gevangevreadelouriezh pe ar'gevunouriezh heulavelour' a zo diazezet war un hollvedelouriezh hag a zo amsteriek an awenadur anezhi.

A-hend-all, penaos tizhout an uhelpal a zo merket gant ar gelennadurezh-se ? Moarvat ez eo damziskouezet an hent a zlefe kas d'ar gevangevreadelezh. M'em eus komprenet mat o lenn al levr, - an ensavadurioù etrevroadel ha dreistbroadel, ar c'hevanennoù armerzhel-politikel (K.A.E., KOMEKON h.a.), an impalaeriezhoù zoken,

(1) "heulavelour" = "eschatologique". Diwar batrom "olaf" ("diwezhañ holl")e kembraeg o klotañ gant "heulañ" diwar "heul" e brezhoneg.

Stadoù-Unanet, Unvaniezh-Soviedel ha Sina a zlefe bezañ degaset d'en em glevout dre ret, gant an aon rak an drouzivezh atomel ha youl ar pobloù mui-ouzh-mui emskiantek, 'dozwerinekaet' ha kenurzhiet, diouzh un tu, ha gwered an nerzhoù trobarzhel - a seurt gant hini an emsav e Breizh - o tennañ da lakaat an impalaeriezhoù-se da dazzañ en ur ziazezañ unvezioù politikel bihan lec'hiet war an hevelep pazenn hag aesoc'h dezho en em glevout kene-trezo. Gortoz a ra ar gevangevreadelourion sevenidigezh omennadenta un tamm evel ma c'hortoze ar gomunourion gentañ sevenidigezh o huñvre diouzh diskar 'natur' ar gevalaouriezh da heul an enkadennoù armerzhel dleet da zislavaroù diabarzh ar reizhiad-se. Hogen, a-hend-all, ret mat eo anzav n'eus emsav nag aozadur kevrangevreadelour ebet, daoust maz eus un nebeut luskadoù oc'h ober dave d'un doare hollvedelouriezh pe d'ur gevreadelouriezh europat a denn kalz d'ur riezvelouriezh europat, hep-muiken. N'o deus ar gevangevreadelourion niderezh ebet evel m'o deus ar varksourion ; n'en em harpont na war ur stourm etre renkadoù (forzh penaos ez eo kemeret al lec'h er rez-se gant ar varksourion, na petra!) na war ur stourm etre broadoù ; moarvat e lakaont o spi e berzh an emsav "kenelelour" hogen diouzh maz eus anezhañ n'o deus ket krog ennañ ; e dalc'h ar gleizelourion varksat pe led-varksateo al luskadoù-se evit ar poent hag a-wechoù, en trede bed, ez int reolet war-eeun gant an impalaeriezhoù marksat a Rusia pe Sina (kv. degouezh Angola ha Mozambique). Dre se maz eus e Bro-C'hall un nebeut kefredourion a-du gant ar gevangevreadelouriezh n'en em harp ar re-se war nerzh politikel resis ebet ha ne c'hellont reiñ sikour ebet d'an emsav, lakaomp.

Mank an taolennadur eus ar reizhiad kevangevreadelour roet deomp ebarzh al levr "En donvor da Vreizh" ez eo an difetised anezhañ, a soñj deomp. Sichenn ur seurt reizhiad a zo ar reizhwir a zo anezhañ ur c'heal trabedel ha n'en deus ster ebet er bed danvezelour - er pleustr pe a-c'houez d'an holl - ma vevomp ennañ. Pennahel ur seurt reizhiad ez eo ar Barnour-Meur a zo anezhañ un doare unpenn hag aotrouniezh speredel a laka

da soñjal en ur Pab krennamzerel. Ar gudenn eo dres avat gouzout hag-eñ e c'hell ur bed ijinerezhel ha greantel a seurt gant hon hini klotañ gant ar gravezelezh a chom e diazez ar gevangevreadelezh hep ma vije diskleriet fraezh e skridoù damkanourion al luskad-se.

Kement-mañ eo a fell deomp diskleriañ :

Hor bed, e-giz m'emañ, a zo diazezet war ar galloud armerzhel. Ar galloud-se, avat, en em astenn en tu-hont da harzoù ar riezoù evitañ da chom dirgel ha kuzh e pep pazenn eus ar gevredigezh etrevroadel. Ma vefe diazezet ur Riez kevreadel wirion en Europa, lakaomp, evit kregiñ, daoust ha reolet e vefe ar galloud-se gant ar pobloù evit keloù se? Gant peseurt beliezh e vefe dasparzhet ar c'henderc'herezh etre ar broadoù, lakaomp? Daoust ha ne vo ket gant ar riezoù o devo ar muiañ a c'halloud armerzhel er c'hevread? Ha daoust ha ne vo ket termenet gant ar re-se ar patromoù stuzegezhel a vo degemeret gant ar broadoù bihan a vo, er pleustr, gougevanet outo? Ha, neuze ouzhpenn, daoust ha kemmet e vo sevenadur ar C'hornog, lakaomp, ur C'hornog a zo gouestlet d'ar beveziñ danvezel, war zigarez ma vo bet diazezet ur reizhiad kevreadel - ha pa ve unan wirion - en Europa? Ha maz eus un dispac'h speredel da ober war beseurt diazezoù e vo graet? Gwelet hon eus e c'helle ar gevangevreadelouriezh klotañ evel reizhiad kerkoulz ouzh an anveliouriezh hag ouzh ar "gevunouriezh eulavelour". Nemet e c'houlakafe ar gevangevreadelourion e c'hell talvoudoù boutin bezañ degemeret gant emsavioù disheñvel krenn o diazezoù prederouriezhel, pezh a zo ivez goulakaat ez eo mat ar bed a zo bet krouet war zis-mantrou ar Feiz kristen, ha ne c'hoarvez an talvoudoù nemet eus emzougou diavaez ha na zalc'hont kont ebet eus ar ster a rofe pep hini dezho. Evit klozañ : aon a zo na zisoc'hje ar gevangevreadelouriezh 'hollvedel' - a roer ul lec'h brasdezhañ e lodenn gentañ oberenn Jil Ewan - d'un doare hollveskerezh kredennoù a zo prientet deomp end-eeun gant aozadurioù etrevroadel - a-hervez - reolet avat e devoud gant impalaeriezhoù a bep seurt.

Unan bennak, war-lerc'h lenn ar burutelladur-mañ, a soñjo e tistaol IMBOURC 'H ar gevangevreadelouriezh hag en em c'houlennno perak he deus embannet oberenn Jil Ewan.

Da gentañ hon eus embannet oberenn ar skrivagner evel un diell talvoudus, mat da vroudañ preder an em-saverion ha n'eo ket tamm ebet evel ur c'hatekiz. Dedennus, deurus ha gwirion, savet a-hend-all en ur brezhoneg start, yac'h ha reizh, pinvidik ha resis ez eo an oberenn dre vras hag a-hend-all n'hon eus ket kavet kalz tra da abegañ en div drederenn diwezhañ eus al levr, el lodennoù a zo gouestlet d'an emsav ha d'an Iliz.

Evit pezh a zo eus ar gevangevreadelouriezh sellet evel reizhiad politikel, avat, ne c'hellomp degemer anezhi nemet evel renad ur riez vrezhon, evit ezhommoù pobl ar Vrezhoned. Ar pezh a lavar Jil Ewan a-zivout dinazelerezh enebet ouzh politikerezh a zo gwirion. E Breizh, end-eeun, e ranker diwall diouzh ur renad diazezet war ur strollad stadel a zastumfe ennañ holl vuhez politikel ha kevredadel ar vroad hag a sachfe dezhañ an hollc'halloud; bukañ a zleer, er c'hontrol, ouzh ur reizhiad a rofe tu e Breizh da zigreizennañ ar galloud war holl bazennoù ar gevredigezh hogen a chomfe kreñv ha dishual a-grenn en diavaez evit mirout na vije sujet ar vro-mañ da levezonioù a c'hellfe breinañ ha distrujañ anezhi a-benn ar fin (moarvat on emouezouzh an dislav-ar a zo etre an div hetadenn-mañ met ne fell ket diskoul-mañ amañ ar gudenn am eus nevez stignet); e-barzh "En donvor da Vreizh", da skouer, n'eus ger ebet diwar-benn riegezh wirion ar riezoù hag al luoez a zo ar gwarant anezhi ha re a fiziañs a roer d'ur feulster arouezennel a denn mui-ouzh-mui d'ar folklor (pezh na dalv ket, ev-eljust, omp a-du gant ur feulster foll ha dic'hoanag).

Beziadus eo eveljust e vefe diazezet a-benn un nebeut kantvedoù un doare kempouez en un hollved kanttroet hogen daoust hag ezhomm a vo eus ul lezenn skrivet hag eus ensavadurioù evit gwarantiñ ar c'hempouez-se? Kement-se, d'hor soñj, n'eo ket anat..."

K.L.
.....

LIZHIRI

A-berzh Y. S.D.

"Plijus e kavan emdroadur IMBOURC'H abaoe ur bloavezh bennak. Deuet eo ar gelc'hgelaouenn da blediñ mui-ouzh-mui gant kudennoù relijiel hervez kelennadurezh an Iliz. Meur a wech e oa bet klevet ha lennet : "Kudenn Vreizh n'eo ket hepken sevenadurel, politikel eo ivez", pezh a zo gwir ha diglok ivez. Kudenn pep bro evel hini pep bro a zo, da gentañ, relijiel ha kement-se a seblant bezañ bet komprenet gant IMBOURC'H. Ne chom ket mui war-c'horre ; mont a ra betek penn ar gwirizioù...

Levr Jil Ewan a hañval din bezañ ur mell oberenn ha pouezus bras he divoud. Un oberenn a ya betek beg ar gwirizioù ha betek ar barr-uhelañ, un oberenn venoziad el ha gwirvoudel kenañ. Frazennoù da glozañ pennadoù zo (da skouer, 4 ha 5, pp.154 & 164) : "Dasorc'het eo Krist an Tudadoù : klod dezhañ..." a ziskleir ervat kefridi bennañ mab-den : azeuliñ an Doue bev.

Daoust ha ken gwirvoudel eo al levr e-keñver barregezh an dud da seveniñ an uhelvennad kinniget gantañ ? Ne oufen respont rak n'em eus lennet nemet lodennoù eus al levr. Gorrek on o lenn, gorrekoc'h c'hoazh pa choman gennet gant gerioù diaes. Ezhomm ' zo gerioù resis pa vez kaoz a draoù pouezus. Moarvat avat en dije gallet Jil Ewan implijout gerioù ha troioù-lavar aesoc'h da gompren. Henn ober en deus graet e-barzh pennadoù embannet war "Dihun" hag "Armor". Muioc'h a vad a c'hellfe ober e levr rak gant muioc'h a dud e vefe lennet. Me ' soñj e vefe mat diwall diouzh gerioù re hir e-giz "kevan-gevreadelouriezh" ; kent implijout ur ger nevez, talvoudus e ve gwelout hag-eñ e c'heller e zistagañ hep ober ur pezh strivadenn da gemer e lañs.

Gwir eo e c'heller a-wechoù en em vodañ un tolpad tud ha lenn a-gevret ha studiañ ivez levr pe levr : kelc'hioù-lenn. Kement-se a zo bet graet e-doug devezhioù-studi Kistinid ha plijus ha talvoudus eo bet. N'eo ket posupl avat henn ober gwall alies ha peurliesañ e vez lennet al levrioù gant pep den en e gorn e unan.

E traoñ ar bajenn 159 ha krec'h ar bajenn 160 e seblant lavarout an oberour o deus gortozet ar gristenion fin an ugentvet kantved evit degemer digant tud nann-kristen talvoudoù a c'hell klotañ gant ar spered kristen. Gwir eo ez eus bet nac'hadennoù a seblant deomp bezañ direizh hiziv : nac'hañ al lidoù sinaat bet implijet d'ur mare zo gant ar Jezuisted, nac'hañ ar slavoneg evel yezh sakr. Kalz a vennozioù hag a voazamantoù, avat, a zo bet degemeret pe enkorfet gant ar gristenion : kelennadurezh Platon, Aristotelez, gouelioù ar Bganed bet krisenaet, gizioù zo a vuhez relijiel er Viet-Nam, an Amerika latinek... Tud barrekoc'h egedon a c'hellfe morvat hiraat roll an talvoudoù nann-kristen degemeret gant an Iliz hep noazout ouzh ar Feiz..."

=====

Digant ur c'houmananter :

"Al lizher-mañ da gemenn deoc'h n'emaon ket e soñj adkoumanantiñ da IMBOURC'H ; ne blij ket din ar skiant-faltazi war dachenn ar politikerezh, dreist-holl gant ur vlazenn aviel..." L.K.

War a seblant e tamall hor c'henskriver da IMBOURC'H utopegezh pennadoù zo. Peseurt skrivagner avat en deus savet ul levr diwar-benn "L'utopie ou la mort?" P'emañ ar bed war var kalz muioc'h da dreiñ d'u ifern eget d'ur baradoz, daoust ha n'eo ket poent prezeg an utopegezh ?

=====

Digant L.C.

"Emaon o klask kompren "En donvor da Vreizh" a zo start kenañ.

Diaes tre e kavan ar geriadur a zo dizurzhiat penn-da-benn. Gwelloc'h e vije bet, d'am soñj, lakaat ur geriadur gwirion e dibenn ar gelaouenn, pe lakaat an troidigezhioù e traoñ pep pajenn..."

=====

KELEIER BERR DIWAR-BENN OBEREREZH "KRISTENION BREIZH"

Aozet ez eus "Devezhioù-studi" e Kistinid e dibenn miz Kerzu 1975 hag a zo bet heuliet gant un dek bennak a berzhidi. E-kerzh an devezhioù-studi-se ez eo bet studiet peurgent levr Jil Ewan "En donvor da Vreizh" hag ar c'hudennoù stag ouzh ar gevangevreadelouriezh.

- D'ar sadorn 21 ez eus bet dalc'het daou emvod kelaouif diwar-benn kudennoù ar Feiz hag an Iliz e Breizh e kêr Vrest, e 'Ti an Holl' en 'Harteloire' hag en oaled Sant-Erwan.

- D'ar sul 7 a viz Meurzh ez eus bet prientet un oferenn vrezhonek e Sant-Malo. Un tri-ugent bennak a dud o deus kemeret perzh enni. Deuet e oa izili eus "Kristenion Breizh" eus Roazhon da gemer perzh ivez hag ar re-mañ o deus tremenet an endervezh e Sant-Malo gant brezhonegerion ar gêr-se. Anv a zo a brientiñ un oferenn all a-berzh "Kristenion Breizh" e Sant-Malo e-kerzh an trede trimizvezh.

+++++

